

**hor yezh**

**BERNEZ ROUS**

**ANVIOÙ - LEC'H  
AN ERGE VRAS**

**122**

Hor Yezh  
Brezhoneg  
yezhoù keltiek all  
yezhoniezh

niv. 122

Miz gwengolo 1978

Kelaouenn a yezhoniezh savet gant Arzel Even

Koumanant : 40 lur evit 4 niverenn

(50 pajenn a vez da nebeutañ e pep niverenn)

Rener : Per DENEZ

Sekretour : Yann DESBOURDES, 1 place Ch. Peguy, Poullbriant,  
29260 LESNEVEN

Koumanant paet dre gont-chek : 40 lur da P. Denis, Le Ris, Ploare,  
29100 Douarnenez - CCP. 1499-51 RENNES.

Koumanant paet dre gont-bank : 40 lur da b-Per Denez, Ri, Ploare,  
29100 Douarnenez

Diskleriet : trede trimiziad 1978.

Niv. CPPAP 51765. Aotre post. Liestennet ez-prevez gant HOR YEZH.

Merour : Per DENEZ

Pep gwir miret strizh.

Ezel eo HOR  
YEZH  
eus  
KUZUL AR  
BREZHONEG

Priz an niverenn-mañ : 25 lur

**hor yezh**

**BERNEZ ROUS**

**ANVIOÙ ~ LEC'H  
AN ERGE VRAS**

**122**

## K I N N I G

Kustum eo HOR YEZH, abaoe ur pennad-amzer, da embann al labourioù mestranezh savet e brezhoneg gant studierien ar Gevrenn Celtiek e Skol-Veur Breizh-Uhel, Roazhon. Gouiziegezh talvoudus a vez dastumet er skridoù-se ha soñjet hon eus e oa pec'hed o lezel da bouldrenniñ, mui pe vui, el levraouegoù. Ken-se hon eus roet dija d'hol lennerien ar studiadenn savet gant L. KERGOAT (Labour ar foenn e Plogoneg), Gwendal DENEZ (Ur vuhez e Douarnenez), Lilian AR BRAS (Mari, amzer eurus meche paseet me bourap), Mark KERRAIN (E Sant Nigouden, Theo Michel), Y.E. AR C'HOG (Strudiadenn war yezh Ivon Crocq). Setu amañ bremañ ul labour aketus all gant Bernez ROUS diwar-benn parrez an Erge-Vras. Da heul e teuio ul labour talvoudus all gant Anna AR BIHAN diwar-benn ar brezhoneg e-barzh ar gazetenn L'Heure Bretonne.

Goulenn a reomp digant hor c'heneiled hor skoazellañ dre werzhañ niverennoù HOR YEZH pe dre zastum koumanantoù.

P.D.

Ar skrid embannet er pajennoù da heul a zo bet kinniget gant Bernez ROUS evel labour mestroniezh e Kevrenn ar C'heltieg, Skol-Veur Breizh-Uhel, Roazhon.

Ar varnerienn a oa an Ao. L. Fleuriot, rener ar Gevrenn Geltiek, ha Per Denez

## TAOLENN

### A - DIGORADUR

- a) Pal ha bevennoù ar studiaden
- b) Doaeoù labourat
- k) Doareoù kinnig
- d) Levrlennadurezh
- e) Erge-Gaberig : lec'hiadur, topografiezh

### B - AN ANVIOU-LEC'H

#### 1 - Anvioù o tennañ d'an uhelder

- a) Menez
- b) Krec'h
- k) Run
- d) Ar re all

#### 2 - Anvioù o tennañ d'an dour

- a) Gwern
- b) Meilh
- k) Pont
- d) Poull
- e) Stankenn
- f) Kudenn "guen"
- g) Ar sterioù
- h) Ar re all

#### 3 - Anvioù o tennañ d'an gwez

- a) Bod
- b) Koad
- k) Kili
- d) Ar re all

#### 4 - Anvioù gant KER

- a) An anv ker
- b) Ker + anv den
- k) Ker + anv gwan
- d) Ker + anvioù all

#### 5 - Anvioù gant TI

#### 6 - An hentoù

#### 7 - Anvioù all

8 - Anvioù istorel

- a) CLUYOU, CASTEL
- b) Anvioù gant LEZ

9 - Anvioù relijiel

- a) an iliz, ar cheplioù
- b) An trevioù
- k) Ar c'hroazioù

10 - Erge-Gaberig

K - AN EMDROADUR

- 1 - Ar c'hêrioù koshañ
- 2 - Ar c'hêrioù nevez krouet (abaoe 1835)
- 3 - Ar c'herioù aet da get
- 4 - Ar gêr hag he farkoù

Roll an anvioù-lec'h bet studiet, o distagadur hag o stummoù kozh  
Roll an anvioù-lec'h hag an anvioù-tud bet meneget er studiadenn

## DIGORADUR

### a) PAL HA BEVENNOU AR STUDIADENN

Ar gwir eo ganit Fañch Elegoet, pa 'peus laret din, ne oa ket ar mare da sevel studiadennoù war an anvioù-lec'h. Emsavoc'h zo d'ober gant hor sevenadur bev ha mont da enrollañ digant ar re gozh danevell o buhez. N'eo ket furchal el levraouegoù nag en dielloù eo ar mallusañ met dastum ha renkañ perzhioù hor sevenadur hengounel o vont da get gant tizh an ugentvet kantved. Mervel a ra bemdeiz tud o kas ganto teñzor o buhez, test ma 'z int bet eus distrujedigezh hor sevenadur pobl, hor c'hevredigezh dibar. Al labour dastumse eo poent ober anezhañ hag e rin. Evit-se ne vo ket didalvoud din an enklask n'eus graet war anv ar c'herioù hag ar parkoù.

Tro m'eus bet da anavezout peizanted ma farrez dre zigarez goulenn gante traoù diwar o c'hêr : hag eñ ez eus bet kavet ganto brikennoù ruz ? perak ez eus ur *Park an Iliz* amañ hag all ... Dedennet-tre int gant kement tra e sell eus istor o c'hêr, o familh hag un doare, ur digarez -ha n'eo ket toull anezhañ- da vont pelloc'h, komz ganto eus ar vuhez o deus renet, lakaat anezho da ganañ ha kontañ mojennoù.

Un dra all en deus broudet ac'hanon da gas a-benn ur seut labour. Da geñver ar c'huzul kêr hag ar c'homision istorel ha kulturel nevez savet diwar e intrudu, e c'hell ur seurt studiadenn kaout pouez. Al lec'h anvadurezh n'eo ket nemetken an traoù kozh, krennamzevel ; krouet 'vez bep bloaz anvioù lec'h, dreist-holl en ur barrez e-giz Erge, lec'hiet e-kichen Kemper. Da ziwall 'zo e vleunfe anvioù n'o dije netra da welet gant al lec'h pe ve vijent gallek pe vrezhonek -doare : *rue des oiseaux, lotissement des myrtilles*. Tu 'vo marteze da lakaat anezho da reizhañ stummoù 'zo, mac'hagnet diwar c'hallekadur peurliesañ. Bez he deus Erge he *croissant (Kroaz-hent ar Gili)* eveljust, met dre vras ne gaver ket traoù spontus. Fazioù war ar c'hadastr, war roll an I.N.S.E.E. pe war gartenn an I.G.N. a zo ur strobadig dioute : *Cadigou (koatigoù) - parc loc'h guen (Park Loch Gwenn)* hag all. Gallekaet eo bet ar skritur re alies : *place an dañs, Le Lec, Lenhesq ...* met ivez siwazh anvioù a-bezh : *La Croix Rouge, Moulin du Faou, Salverte ...*

Pal kentañ ar studiadenn a zo memestra degas traoù nevez da skiant an anvioù-lec'h. Peurliasañ e kaver studiadennoù war ur ger (*kleuz, loc, lec'h, krec'h ...*) diwar stummoù kozh bet kavet en dielloù kozhañ. Kement-se a vez adkavet er studiadennoù hollek (Gourvil, Tanguy, ...) e lec'h 'vez keñveriet ar stummoù kozh etreze ha roet martezeadennoù e-leizh. Diouer a stummoù kozh a zo enno peurliesañ, nemet ar re a adkaver en diellaouegoù. Nebeut a studiadennoù lec'hel a zo bet graet (Sant Vig, Ledenez Ruiz, ...), ne vez ket meneget (pe nemeur) ar stummoù kozh enno.

Ar studiadenn-mañ a zegaso kement stumm kozh a zo bet tu din da gavout en ur furchal e-barzh an holl dielloù koshoc'h eget an XVIIIvet kantved. Diskouez a ra pegen faltazius e c'hell bezañ un displegadenn pa n'eo ket diazezet warne. Ne roon ket avat alc'houez pep ger met resisaet 'vez dalc'mat an traoù gante. N'eus ket bet klasket reiñ ur ster resis da gement anv-lec'h, nemet displegañ ar pezh zo bet kavet. Ar pezh a gont eo gouzout ez eo *Kerveguen* savet gant *KER* + anv den *Kergueguen* e 1458. *Gwegen* ne vo ket displeget ganin rak ne rafen nemet adskrivañ ar pezh 'zo bet laret gant ar re all. Dedennusoc'h eo e vije bet anataet ne teufe ket eus ur ger *begenn* pa traoù all.



## b) AN DOARE DA LABOURAT

Evit kas da benn al labour-mañ, em eus ranket bodañ ar muiañ a elfennoù a c'hellen hag urzhiañ anezho tamm ha tamm. N'eo ket hep diaester anat eo, strewet ma 'z int un taming e pep lec'h. Displegañ peseurt hent on aet gantañ a servijo marteze da dud all a vije c'hoant ganto studiañ anvioù lec'h o c'horn bro.

### 1 - Sevel roll an anvioù-lec'h

Tri roll d'an nebeutañ a c'heller sevel eus anvioù lec'h ur barrez. An hini koshañ anezho a ranker ober diwar ar c'hadastr kozh. Treset eo bet hini an Erge Vras e 1834. Ouzhpenn ar c'hartennoù e kaver ivez ar mammannoù o reiñ anv kement kêr ha kement park a oa er gumun d'ar mare-se.

Nevez 'zo, e 1962, ez eus bet savet ur c'hadastr nevez diwar batrom an hini kozh. Gantañ ez eus tu da sevel ur roll all ha studiañ an emdroadur abaoe 1834. Kalz tier nevez zo bet abaoe, dezho anvioù brezhonek eveljust ; da dra zo aet re all diwar ar c'hadastr.

En ur ober gant an tri roll-se e tastumer 210 anv. Setu un daolenn o tiplegañ an niver a gaver war ar rolloù hag er c'hantvedoù a-raok :

| Kadastr 1962 | Roll an INSEE 1946 | Kadastr 1834 | 17vet kantved | 16vet kantved | Kent 1500 |
|--------------|--------------------|--------------|---------------|---------------|-----------|
| 170          | 185                | 126          | 93            | 50            | 16        |
| 80%          | 88%                | 60%          | 44%           | 23%           | 7%        |

### 2 - Klask en dielloù

N'heller ket displegañ ster an anvioù-lec'h nes ober gant o stummoù kozh. E-leizh anezho a gaver war rolloù an dud varv, ar re zimezet hag ar re nevez c'hanet. Chom a rae un nebeut kaieroù eus ar bloavezhioù 1630-1640 e dielloù Erge a zo bremañ e Dielloù Penn ar Bed Kemper. Nemeur a anvioù-lec'h a zo enno siwazh. Kalz fonnusoc'h int diwezhatoc'h tro ar bloavezhioù 1670-1680. Ar re-se zo aet d'ober ma eostad kentañ.

Daoust d'an anvioù-se bezañ bet skrivet diwar zorn ar memes person ez eus meur a stumm dioute. Kavout a reer : *Crech Ergue* (1677), *Guenech Ergue* (1680), *Krech* (1682), *Gueneach Ergue* (1684). Met mat eo bet din notenniñ kement hini zoken ar re a seblante faltazius a-walc'h da geñver ar mare.

Aet on war-lec'h da splujañ en dielloù koshoc'h, betek 1450 lod anezho. Siwazh n'on ket ur mailh evit c'hoazh war an henskridoniezh ha start eo bet din digejañ kement dornskrid e-giz hemañ savet e 1541 (Gwelout al luc'hskeudenn war ar bajenn a-dal da houmañ).

Setu, islinennet, an anvioù-lec'h a gaver e-barzh :

*Ergue Guabiryc, Kerfors, Parc Keralias, Parc an Can, Pont Bigodou, Penan-quenech, Kermpercourtin, Quenech Ergue, Stangbyhan, Kermorvan, Coray.*



Disoñjet em eus un hiniennoù bennak emichañs e-barzh dielloù all. N'em eus dastumet nemet ar re a oan sur eus o skrivadur.

Nebeut a dra eo em eus kavet e Diellaoueg ilizoù Kemper. Diwar Embannadur Peyron (1909) n'em eus tennet nemet stummoù koshañ Ergue Gaberic, anv an div ster *Jet* hag *Oded* ha *Botsinsic* e lec'h ez zus bet ur chapel gwechall. N'eus roud ebed Erge nag e Diellaoueg Landevenneg hag e hini Kemperle. Sed gwall dreut ar geustereñ evit ar pezh a sell eus ar grennamzer.

### 3 - An distagadur

Bez emañ gant kement lec'h displeget e zistagadur. N'eus ket tu dioueriñ dioutañ pag e ro deomp elfennoù pouezus o c'hadarnaat traoù 'zo : *Kerelan* a vez distaget /kɛrɛl/. A-du e ya an /ɛ/ gant un displegadenn diazezet war ar ger henvrezhonek hael. *Melenec* /avelɛnek/. Gant ar c'hemmadur M/V warlerc'h ur ger mell e ouezer ez eus ur ger gwregel deus outi. An Erge Vras. Gant ar c'hemmadur B/V ez eo anat emañ gwregel Erge. Graet em eus gant aroueziadur fonetek Lukian Kergoat (Hor Yezh 106-107), tostik mat m'eo brezhoneg an Erge ouzh hini Plogoneg.

### 4 - An parkoù

Roll parkoù ar gumun a gaver war vammennoù ar c'hadastr kozh. Talvoudus int rak kalz a lec'hioù nevez annezet o deus kemeret anv ar park lec'h emaint bet savet. N'int ket evit sikour kalz da ziskuliañ an anvioù koshoc'h. An anvioù gant *guen* a zo bet graet ur studiadenne ispisial diwar o c'horre.

Da reiñ un tañva eus anvadur ar parkeier ez eus bet studiet ur gêr hec'hunan pa 'z eus enni krec'hioù ha stankennoù.

### 5 - Goulenn digant an dud

Anvioù 'zo a zo aet penn-da-benn diouzh spered an dud. A-benn neuze e klever traoù farsus e-giz *Coutili* = Les Couteaux pe *Congallic* = le Couvent du Français hag all.

Talvezout a ra koulskoude evit un nebeut diskleriadurioù e-giz mojenn *Sant Aler* pe hini *Kerdevoñ*. N'eus ket da fiziañ re e-barzh ar pezh a lavar an dud nemet evit goulenn talvoudegezh ur ger e-giz *Karbont* da skouer.

### 6 - Al levrioù, ar pennadoù

Un displegadenn a ranker klask da gement anv. Setu ma ranker klask er geriadurioù -dreist-holl er geriadur istorell- hag el levrioù e-giz hini Gourvil : "Noms de familles bretons d'origine toponymique". Dav eo teurel ur sell war gement pennad a lec'hanvadurezh ez eus tu da ziskoachañ hag ober e vad eus kement ali.

## K- AN DOARE KINNIG

A-rummadoù eo bet lakaet ganin an anvioù-lec'h. E-giz-se ne oa ket ezhom adlavarout meur a wech ar memes tra. Aesoc'h eo keñveriañ ar stummoù kar pa 'z int strollet d'ober ur studiadenn nemetken : *Krec'h Erge*, *Kenec'h Deniel* ha *Penn an Nec'h* a zo tri stumm o tont eus ar memes gwrizienn da skouer.

Lod eus an anvioù eveljust n'eus ket bet kavet plas dezho er rummadoù dibabet. Alies n'eus ket un dalvoudegezh resis ganto ha gwellec'h lakaat anezho a-gostez.

Ur roll klok eus an 210 anv studiet a zo bet lakaet da glozañ an tamm labour-mañ. Dre urzh al lizherennoù int hervez o skrivadur ofisiel, hini ar c'hadastr. Gante e kavfoc'h o distagadur hag o stummoù kozh hervez an dielloù, ar c'hadastr ha roll an INSEE.

Diwar kement a stummoù m'eus klasket ur stumm reishoc'h hervez skrivadur ar brezhoneg. Hemañ a gavfoc'h etre krochedoù da heul kement anv studiet. Dalc'het m'eus kont eus disgagadur ar vro evit un nebeut lec'hioù : diaes eo kinnig e vije skrivet (Garzhaleg) koulz miret *Garzhaleg*. N'on ket aet kennebeut da heul ar stummoù kozh dre zigarez lakaat fraezh talvoudegezh orin ur ger. N'eus ket tu kinnig *Lez Gouvenec'h* pa vez distaget /lezγũãnax/.

## D- LEVRLENNADUREZH

Berradurioù :

A.B            Annales De Bretagne

D.I.K           Dielloù Ilizoù Kemper, Cartulaires des Eglises de Quimper

F.P.N           Flintshire Place Names

H.Y            Hor Yezh

I.N.S.E.E      Institut National de Statistiques et d'Etudes Economiques

M.S.H.A.B.    Mémoire de la Société d'Histoire et d'Archéologie de Bretagne

Bécharde G.

- Les noms de lieux entre la Rance et le Gouet. Tezenn, Roazhon 1967.

Bernier G.

- Les formations végétales en It-ovet issues de la terminaison itum-Etum. in A.B. 1971.

- La toponymie de la presqu'île de Rhuis. in A.B. 1967

Brengar

- Studiadennig diwar-benn anvioù-lec'h ur barrez e Kernev-Izel. Hor Yezh n° 2-4 1958

Buffet H.F.

- La toponymie du canton de Prt-Louis. A.B. 1952

Couffon R. Le Bars A.

- Répertoire des Eglises et Chapelles du diocèse de Quimper et du Léon. Saint-Brieux 1958

Davies E.

- Flinshire Place Names, Gwasg Prifysgol Cymru 1959

- A gazetteer of Welch Place Names. Gwasg Prifysgol Cymru 1959

Debary M.

- "CLEUZ". M.S.H.A.B. 1956

Durand Y.Y.

- Toponymie de la commune de Pléneuf. A.B. 1960

Ernault E.

- Glossaire Moyen Breton. Paris 1895

- Geriadurig Brezhoneg-Galleg. Saint-Brieuc 1927

Falc'hun F.

- Les noms de lieux celtiques. Rennes 1966

- Introduction. Nomenclature des hameaux écarts et lieux dits du Finistère. INSEE

Fleuriot L.

- Dictionnaire des Gloses du Vieux Breton. Paris 1964

- Recherches sur les Enclaves Romanes Anciennes en territoire Bretonnant. Etudes Celtiques 1958.

Gourvil F.

- Noms de familles de Basse-Bretagne. Paris 1966

- Noms de familles bretons d'origine toponymique. Quimper 1970

Grégoire de Rostrenen

- Dictionnaire françois-celtique ou françois-breton. Rennes 1742

Guillou J.

- Petites etymologies bretonnes. Quimper 1882

Hemon R.

- Geriadur istorel ar brezhoneg

Holder A.

- Alt Celtisher sprachschatz. Leipzig 1925

I.N.S.E.E.

- Nomenclature des hameaux écarts et lieux dits, département du Finistère.

Kervella F.

- Anvioù-lec'h ar vro vrezhonek. Hor Yezh n° 96

Lagadeuc J.

- Le Catholicon

Larguillère R.

- Les saints et l'organisation chrétienne primitive dans l'Armorique bretonne, Rennes 1925

- La topographie du culte de Saint Gildas. M.S.H.A.B. 1924

Latimier

- L'inscription des Aulnays en Goméné. A.B.

Laurent J.

- Un monde rival en Bretagne au 15e siècle. La Quévaise. Paris 1972

Le Berre A.

- Toponymie nautique des Côtes de Basse-Bretagne. Paris 1962

Le Gonidec

- Dictionnaire Français-Breton. St-Brieuc 1847

Le Grand A.

- Vie des Saints de Bretagne. Nantes 1636

Longnon A.

- Les noms de lieux de la France. Paris 1920-1929

Loth J.

- Chrestomathie bretonne. Paris 1891

- Les noms de Saints Bretons. Paris 1900

- La vie de saint Teliâu. A.B. t. 10

Morice D.Y.

- Preuves pour servir à l'Histoire de la Bretagne. P. 1742-44-46

Morvannou

- Gwennole et Gwenaël. A.B. 1974

Ogée

- Dictionnaire historique et géographique de la province de Bretagne. Rennes 1843

Peyron C.

- Cartulaire de l'Eglise de Quimper. Quimper 1909

Plan cadastral parcellaire de la commune d'Ergué-Gabéric

Quentel P.

KLEUZ "fossé, talus, haie". A.B. 1952

Rostaing C.

- Dictionnaire des noms de lieux de France. Paris 1963

Smith W.B.S.

- De la toponymie bretonne (Supplement to Language). New York 1940.

Tanguy

- Les noms de lieux bretons. Studi n° 3. Rennes 1975

Toberne A.

- La toponymie forestière des Monts d'Arrée. A.B. 1955

Trepos P.

- La notation des toponymes bretons. A.B. 1953

- Les saints bretons de la toponymie. A.B. 1955

- Le pluriel breton. Brest 1957

Troude

- Nouveau dictionnaire pratique Breton-Français du dialecte du Léon. Brest 1876

## E - ERGE-GABERIG

Emañ an Erge Vras ul lev bennak eus Kemper ul levr bennak eus Kemper war zu ar Reter etre hent Brest ha hent Rosporden. Ur hirgarrezenn eo, dezhi tri harz naturel : ar ster Oded eus tu an hanternoz hag eus tu ar c'huzh-heol, hag ar ster Jet eus tu ar c'hreisteiz. Eus tu ar sav-heol emañ penn-da-benn parrez Elliant ha bez e c'hellfed ober harz kevredigezhel eus ar vevenn en tu-se.

Glaziked vez graet eus an Ergeiz ha Meleniked eus an Eliantiz, giz Foen ganto. Nemeur a zarempredoù zo bet a-viskoazh etre an div ouenn, ne zimezer ket glazik ha melenig. Abegoù armerzhel a gaver d'an dra-se ivez : mont a rae an Ergeiz da foar Kemper pag e yae ar re all da Rosporden.


Treuzet eo ar barrez koulskoude gant daou hent roman : hini Kemper-Karaez (an hent meur) hag hini Kemper-Elliant. Dispartiañ a ra an hini kentañ dourioù an div ster a zo o c'hemberiñ e Koutili. Liammañ a ra lec'h izelañ ar barrez (13 m) d'al lec'h uhelañ Loach Laez (140 m). Egile a ya da heul stankenn ar Jet.

Daoust d'an Erge Vras bezañ e-kreiz uhelgompezenn Kernev, n'eo ket plaen anezhi tamm ebet. N'eus nemet menezioù ha stankennoù ha rouez eo gwelet ur park kompez dre ar vro. Displegañ a ra kement-se pegen stank eo ar barrez an anvioù o tennañ d'an uhelder ha d'an dour. Displegañ a ra ivez e vije gwezek mat rak n'heller ket gounit an douaroù war zinaou.





Erge-Gaberig  
Ar sterioù, ar menezioù  
An daou hent meur  
Ar parrezioù nesañ



1 - ANVIOU O TENNAN D'AN UHELDER

a) MENEZ

*Mene Squvidan*  
*Menez Castel*  
*Menez Kerdevot*  
*Menez Kerveady*  
*Menez Loqueltaz*  
*Menez Niverrot*


Graet int holl gant *Menez + anv kêr*. Ne oa ket dioute war ar c'hadastr kozh. Ur bern parkoù a oa anv dezhe *Menez* ; warne ze eus bet savet tier nevez 'zo, ha staget anv ar ger nesañ ouzh *Menez*.

-- Menez Groaz /mi:naɡrɔɛ:z/ (Menez ar Groaz)

Bez 'zo ur groaz el lec'h-se. Ur park eur *Kermorvan* a zo en anv : *Park ar groaz*. Uheloc'h emañ *Penn an nec'h*.


-- Bec ar menez /bɛk mi:n/ (Beg ar Menez) e 1678 : Bec ar Menez

N'emañ ket *Beg ar Menez* war-benn laez ar menez e-giz ma vije bet gortozet. Pa seller ouzh krommennoù an uhelder e teu war ur seurt genou hag a vije reishoc'h amañ marteze troiñ *Beg ar Menez* gant "bouche de la montagne" ha n'eo ket "point, bec, bout, extrémité" e-giz eur boas da droiñ anezhan.



-- Penn ar menez /penmi:n/ (Penn ar Menez) e 1678 : Bec ar Menez

Souezh ebet da gaout : emañ lec'hiet ar gêr-mañ war-benn *Menez Kerdevot*.



## b) KREC'H

-- Quenecrasec /kɛnkraːɛk/ (Kenekrazek) e 1684 : Kerancrasec

En e levr "Les noms de lieux bretons" e ro Tanguy skouer *Kercrazec* e Landrevarzeg (p. 72) a oa kavet gwechall gant stummoù *Kenecrasoc* (XIIIvet) ha *Chneccrasvc* (XIvet). Er c'hontrol e seblant e vije bet amañ ur skouer eus *Ker* aet da *Kene*. E 1836 e oa skrivet *Quenacrasec* a zo ur stumm etre. Tostik a-walc'h a vez distaget /r/ ha /γ/ e Kerne Izel. desplegañ a ra e vije bet kemmeskaj *Ker* ha *Kenec'h* hemañ distaget /keγ/.

*An Crasec* a zle bezañ un anv den diverret eus "Le Craz".

-- Quenac'h Daniel /kɛːɣ̃tɛːgɛl/ (Kenec'h Deniel), 1678 : Crech deniel, 1684 : Quenach denyel

*Kenec'h* a vez distaget /keγ/ hiziv. Skarzhet kuit eo bet an N etre div vogalenn, e giz e tegouezh dalc'hmat e brezhoneg ar vro.

Distreset spontus eo distagadur *Deniel*. N'eo ket souezhus e vije bet kreñvaet D T war-lerc'h /γ/ ; souezshusoc'h eo ar /g/ e-lec'h an /l/. Gortozet e vije ar c'hontrol : Gwanadur G I = *Kergestin Keryestin Keristin* pe *Elgent Elient*.

-- Creac'h Ergue /kreɣ̃ɛrge/ (Krec'h Erge), 1540-1677 : *Crech Ergue*, 1549 : *Creah Ergue*, 1540-1680 : *Quenech Ergue*, 1543 : *Knech Ergue*, 1604 : *Cneh Ergue* - *Gorecreach Ergue* - *Creach Ergue Huelaff*, 1643 : *Gorequer creach Ergue*, 1684 : *Gueneach Ergué*.

Implijet vez d'ar menez mare pevar stumm disheñvel da *Krec'h* :

XVI vet : *cnech* - *creah* / *knech* - *guenech*

XVII vet : *creah* / *cnech* - *gueneach*

N'eo ket alies e vez kavet *Krec'h* + *anv parrez*, *Creac'h Cast* ha *Creac'h Locmaria* (un trev eus Elliant) a zo nemetken. N'eo ket *Krec'h Erge* lec'h uhelañ ar barrez koulskoude, roet zo bet d'ar gêr an anv-se peogwir emañ war un uhelenn war vevenn teir barrez all : Brieg, Landudal hag Elliant.

-- Pennaneac'h /pɛnanɛχ/ (Penn an Nec'h), 1540 : *Penanquenech*, 1636 : *pennanech*, 1685 : *penaneac'h*.

Tostaat a ranker ouzh Penn ar Menez. An NEC'H a vez implijet c'hoazh en Elliant gant ar ster uhel : mont d'an nec'h. En Erge ne reer nemet gant LAEZ : mont d'al laez.

Ma vez lakaet a-gostez *Kerancrasec/Quenecrasec* e chom ganeomp tri stumm : *Quenac'h*, *Creac'h*, *Meac'h* a dalv ar memes tra. Stummoù disheñvel int o tont eus *Cnoch* hag iskis oe o vent kavet o-zri amañ.

Aet oe ar ger henvrezhonek *cnoch* da *cnech* e krennvrezhoneg. Meur a stumm a gaver war-lec'h :

|               | Henvrezhoneg <i>cnoch</i><br>Krennvrezhoneg <i>cnech</i> |                |
|---------------|--|----------------|
| /-----        | -----/-----  | -----/         |
| <i>Canech</i> | <i>nech</i>  |                |
| <i>Cenech</i> | <i>noch</i>  | <i>Crech</i>   |
| <i>Cinech</i> | <i>nach</i>  | <i>Creac'h</i> |
|               | <i>neac'h</i>  |                |

Petra a gaver en Erge ?

|           |                       |                           |                       |
|-----------|-----------------------|---------------------------|-----------------------|
| XVIvet :  | <i>crech - creah</i>  | // <i>knech, guenech</i>  |                       |
| XVIIvet : | <i>creach - crech</i> | // <i>cnech, queneach</i> | // <i>nech, neach</i> |
| Bremañ :  | <i>krec'h /kre/</i>   | // <i>kec'h</i>           | // <i>nech</i>        |

Kavout a reer dalc'hmat an tri stumm pa vije gortozet nemet unan diwar un emdroadur rannyezhelel.

*Nec'h* ne vez kavez nemet war-lerc'h ar ger mell : *Lein an nec'h* (Senven Lehart), *Kernec'h* (Kombri), *Park nec'h* (Langolen), *Amañ an quenech* (1540) a vez skrivet *anech* (1636). Aet eo kuit ar /c'he/ etre an daou **N** : *an (ke)nec'h*.

An daou all a gaver dindan an daou stumm *Krech* ha *Kenec'h* d'ar memes mare. Penaos displegañ a vije aet unan da *Grec'h* hag egile da *Genec'h* nemet dre abregoù soniadourel a vefe ? *Krec'h Erge*, *Kenec'h Deniel* en ur c'houlakaat a vije an distagadur /tiñgel/ un distresadur nevez a-walc'h.

k - RUN

-- Pennarun /penárɛ:n/ (Penn ar Run), 1544 : *Penanrun*.

-- Reunic /re:nik/ (Reunig)

*Rhunnic* a gaver en Elliant ha tri *reunic* all e Penn ar Bed.

-- Rubernard /rýbɛrn/ (Rubernard), 1684 : *Rubernard*.

-- Rouillen /ru:hɛn/ (Ar Rouillenn).

Stank a-walc'h e vez kavet RU-RUN-REUN e-touesk anvioù ar parkoù, *Rulann* (Bourc'h), *Ru Vian*, *Ru Vras* (Rubernez), *Run Coat* (Griffonez), *Park ar Runven* (Kerveady), *Reunic Bras - Parc ar Reunou* (Meout Vras) hag all. Daou zistagadur disheñvel a zo hervez ma vez kavet RUN e unan /rɛ:n/ pe kevredet /ry/ - /ryn/.

Disheñvel eo kudenn *Rouillen* lec'h n'eur ket sur da gavout RUN dindan e stumm RU. Ur *Ruyen* a zo en Ederm e lec'h 'vije tu gwelet RUN + YEN war ar memes skouer ha *Ker Yen* ha *Prat Yen*. Eus un tu all ez eo posubl e vije aze ur ROZ + YEN, *Roz* a vez distaget /ru:z/. Ha kouezhet vije ar **Z** : *Rouz(z)yen* ?

Tanguy (1) a zispleg *Ruillen* gant "lieu où coulent les galets, éboulis". *Er Rouillen* (Gwidel), *Ruillan* (Roskañvel) ... Gwirheñvel e c'hell bezañ war word ar mor, ne welan ket pelec'h e vije ar mein disac'het evit ar *Rouillen*-mañ.

d) AR RE ALL

-- Pennaros /pɛnarɔːz/ (Penn ar Roz), 1540 : *Penaros*.

ROZ a vez troet er geriadur istorel gant "tertre, terrain en pente douce". Kavet vez alies da anv-park : *Rozlann* (Kerurvoaz), *Rouzic Vian*, *Coat Roz Venn* ... Graet 'vez ROZ eus ur park war zinaou.

-- Pennervan /pɛnɛrv/ (Penn Ervan), 1685 : *Penerven*.

Studiet eo bet gant Gourvil ar stummoù *Leserven*, *Leshervan*, *Lezervant* (2). Ober a ra un anv-den eus *Erven*. Ur sant Erven a zo e Ploue, ur sant Derven e Gregam hag o far a vez kavet e Kembre : Erven, Erwyn, Arvan. Ha padal e kaver *Ervan* e meur a anv-park : *Park an Erven* (Kerampeillet), *Menez an Ervan* (Kerurvoaz), *Menerven bras*, *Menerven Izella* (Kerroue). N'eo ket pusubl e vije Erven anv ur sant na zoken hini un den.

*Erwenn* a gejer gantañ er geriadurioù gant ar ster ero "sillon". Parkoù all a zo dezho anvioù gant ero : *Liors an ero* (Penn an Nec'h), *an Ero Hir* (Killihouarn), *Daouzec Ero* (Lokeltas). Ne semblant ket e vije ERO par da ERVENN.

Ur ster all a zo bet roet da ERO gant Ar Berr (3) "somet d'un sillon, forme en saillie". Bez emañ *Penn ar garreguen*. Ha ne vije ket ar garregenn-se ar "forme en saillie" ? Displegañ a rafe ivez *Menerven* : *Maen-Ervenn* ?

-- Baradozic /barádoːzik/ (Baradozig)

Seizh *baradozic* a zo e Penn ar Bed. Hemañ ne oa ket dioutañ nag e-giz kêr nag e giz park e 1835. War an uhel emañ, ar pezh a glot gant displegadenn Gourvil : lec'h tostañ d'ar baradoz, lec'h uel. Tu 'zo da welet ennañ ivez un doare da envel an tier a weler stank en dreo deomp : "mon rêve" "sam suffit".

Ul lec'h *Paradise* a zo meneget er Flintshire Place Names.

-- Loch Lae /lɔːʒlæ/ (Loch Lae)

Loch Laez. Ul loch d'an nec'h . Loch 'vez graet eus ur savadur dister a-walc'h lec'h e lakaer binviji. A-wechoù e servij da lojeiz evit desvezhourien.

-- Kerhuel /kɛrhyɛl/ (Ker Uhel), 1679 : Kerhuël

Kentoc'h evit "Kêr war an Uhel" ez eus amañ un anv den.

---

(1) Les noms de Lieux Bretons p. 79

(2) F. Gourvil : Noms de Familles Bretons ...

(3) Le Berre : Toponymie Nautique

## 2 - ANVIOU O TENNAN D'AN DOUR

Studiañ a raimp amañ an anvioù e *Gwern*, e *Meilh*, *Pont*, *Poull*, *Stank* ... hag anv an div ster.

### a) GWERN

-- Kervern / κερνερν/ (Kervern)

-- Pervern /περνερν/ (Penn Vern)

Emañ an div gêr-mañ tostik-tost an eil d'eben. Er c'hêrioù nesañ ez eus meur a bark gant gwern : *Pennvern*, *Guern ar Feunteun* (Niverrot), *Prad ar Pennvern*, *ar Penn Vern*, *Penn Vern Bian*, *Guerna* (Kerurvois, Kerdevot). Lakaat a ra anat ne gaver ket amañ un anv-den (Ker + anv den) nag anv ar wezenn. Ur yeun eo.

Heñvel eo ouzh *Penguern*, *Pen y Wern* e Bro Gembre. Ne oa ket dioute e 1835. Deuet eo an anv eus hini ar park lec'h zo bet savet kêr, e-giz ar pep brasañ eus ar re zo bet savet abaoe 1835.

-- Kervernic / κερνερνικ/ (Kervernig), e 1458 : Kerguernic

Dalc'het eo an anv "gwernig" gant un nebeut parkoù eus *Kervernic* (*Guernic Bian*, *Foennec ar Vernic*). Hag eus *Sant Andre* (*Parc ar Guernic*, *Guernic Izella*). Ur wech ouzhpenn n'heller ket gwelet amañ un anv den, met ur wern, ur yeun.

### b) MEILH

Moulin de Coat Piriou

*Meilh Koad Piriou*

Moulin du Dreau

*Meilh Dreao*

Moulin de Kerfort

*Meilh Kerfor*

Moulin de Kerfres

*Meilh Kerfrez*

Moulin de Kergonan

*Meilh Kergonan*

Moulin de Kernaou

*Meilh Kernaou*

Moulin de Lost ar Guillec

*Meilh Lost ar Gilleg*

Moulin de Pennarun

*Meilh Penn ar Run*

Moulin du Poul

*Meilh Poull*

Moulin du Cluyou

*Meilh Kluyou*

Moulin de Pont ar Marc'hat

*Meilh Pont ar Marc'had*

Graet in holl gant MEILH + anv-Kêr. *Dreao* zo anezhi ur ger eus Sant Evarzeg en tu all d'ar ster Jed. Ar pep brasañ eus an anvioù-kêr a oa maneroù gwechall.

Teir meilh zo dezho anvioù all :

-- Moulin du Faou / μελφαο/ (*Meilh Faou*)

Ur park *meilh ar Faou* a zo e Kenec'h Deniel, ar gêr nesañ. Bez e c'hell FAOU bezañ anv un den kentoc'h eget anv ar gwez.

-- Moulin du Jet / μελζετ/ (*Meilh Jed*)

Anv ar ster eo Jed.

-- Papeteries d'Odet / μελπαπερ/ (*Ar Veilh Paper*)

Savet eo bet tro ar bloavezhioù 1800. Hec'h anv oa *Moulin Papier* war ar c'hadastr kozh, hag ober a reer *Meilh paper* diouti c'hoazh. 400 michedour zo implijet e-barzh an deiz a-hirie.

Trizek meil a oa en Erge e 1834. N'eus nemet hini *Meilh Poull* zo bet savet abaoe. Ne chom nemed eizh war ar c'hadastr nevez.

## k) PONT

-- Pont Allen / pɔnlɛn/ (Pont al Lenn)

N'eus roud ebed e-barzh ar parkoù e vije bet ul lenn el lec'h-se. N'eo ket dibosubl e vije bet stanket an draonien d'ur mare bennak d'ober ul lennig.

-- Pont ar Marc'had / pɔnma:ryat/ (Pont ar Marc'had), 1683 : *Pont an Marchad*

N'em eus bet displegadenn ebet diwar-benn orin ar ger marc'had.

-- Pont Odet / pɔno:d/ (Pont Oded)

-- Pont Patra / pɔnpátra/ (Pont Patra), 1677 : *Foennec Pont Ha* ; 1758 : *Foennec Prat Ha*

Petra vije an eil tamm HA ? Dont a ra *Patra* eus "prad Ha", anat eo, kemmesket m'eo bet al lizherennoù e-giz e tegouezh e brezhoneg : banal = balan da skouer.

-- Pont Saint Eloi / pɔnsãño:la/ (Pont Sant Alar)

Anv Sant Alar a gaver meneget amañ c'hoazh (sellit ouzk pennad *Stank Alar*). Emañ en draonienn a vez graet *Stank Sant Alar* deus outi. Laret vez c'hoazh *Penn ar Pont* eus ar pont-se, anv ar gêr nesañ eo.

-- Carpont / karbɔnt/ (Karrbont), 1458-1540-1639 : *Carbont* ; 1670-1677-1682-1835 :

*Carpont*.

*Carbont* eo ar stumm implijet e-barzh ar C'hatolikon. "Voye pavée" eo an droidigezh a vez roet gant Lagadeuc.

War an aod e vez kavet ivez. Roiñ a ra Ar Berr (1) div dalvoudegezh dezhi : "passe pour les voitures" "passage étroit entre deux îles franchissables à gué". Ne dalv ket ar ster-se evit amañ evel-just. E geriaoueg Sant Ivi (2) e ro Heussaff ur stumm /karpɔn/ : pont izel a-zic'h an naoz en ur foenneg pe lec'h ma treuz an hent ur wazh. Setu an displegadenn a zo bet roet din du-mañ : pont bihan da zont tre e-barzh ur park dre an toull-karr.

N'eus hent roman ebet o tremen dre aze setu n'hell ket "voye pavée" displegañ ar ger-mañ. Gourvil a ro an displegadenn "pont permettant le passage de charettes". Merzet en deux ivez ez eus *Karrbontoù* ha n'eus gwazh ebet en o c'hichen.

Evit ar *C'harrbont*-mañ n'eus gwah ebet e-kichen. Met trawalc'h eo kaout un dourig o treuziñ an hent evit ma vije ur c'harrbont e ster Heussaff. d) POULL

-- Pouldu /pu:ldy:/ (Poull Du)

-- Pouldu /p̥u:ldyik/ (Poull Duig), 1450-1544-1643-1679 : *Poulduic* ; 1679 : *Poulduhic*

Un anv boutin tre dre ar vro eo *Poull*. Meur a ster a vez roet dezhañ :

---

(1) A. Le Berre : *Toponomie nautique des Côtes de Basse Bretagne*. Paris 1962

(2) A. Heussaff : *Geriaoueg Sant Ivi*. Hor Yezh

Ar Berr : mare, lavoir, étang, marais, anse, crique, embouchure de ruisseau.

Tanguy : mare, étang, trou.

Pelletier : fosse, fossé, creux.

Gregor : bourbe

e Kembraeg : pool, pond, pit (Flintshire Place Names)

e Kembre e kaver anvioù : Pwll glas, Pwll melyn, Pwll gwyn

Ur poull-dour a zo dour-sac'h ennañ peurliesañ, dour du. Alies e ya da hesk e-pad an hañv hag e ya tamm pe damm da yeun pe da doull fantek.

#### e) STANKENN

Ne implijer *stankenn* nemet gant ar ster traonienn e Kernev-Izel. Biskoazh ne glever an -enn dibenn ha padal e reer dalc'hmat gant ar c'hemmadur dre vlotaat da heul stank. Panevet unan amañ an holl anvioù nevez tre rak ne oa ket boas ho hendadoù da sevel tier war c'hlann ar stêrioù. Lod eus an anvioù zo graet gant *stank* + anv ur gêr ; n'eus netra da lavorout diwar o c'horre. Deden-nusoc'h eo ar re all.

#### 1- STANKENN + ANV-KÊR

*Stank Kerellou*

*Stank Kermoysan*

*Stank Melennec*

*Stank Pennarun*

*Stank Quenac'h Daniel*

#### 2- STANKENN + ANV STER

*Stank Odet*

*Stank Jet*

#### 3- STANKENN + ANVIOU ALL

Stangala /stãŋkɔ:la/ (Stank Alar)

Graet a vez *Stank Alar* bremañ eus un tamm eus traonienn an Oded, etre Kerrouz ha Griffonez. E gwirionez eo faos a-grenn an anv-se rak *Stankenn Sant Alar* a zo anezhi kalz uheloc'h e-kichen Krec'h Erge. Met ul lec'h touristel eo ha m'eus aon ne vo ket tu reizhañ ar fasi-se biken.

Anv *Sant Alar* pe *Alour* eo a gaver amañ. Bez ez eus e Krec'h Erge ur *Park Sant Alour* hag ur park all *Sant Alour ar Glouet*. Ur *Pont Sant Aloura* zo ivez o treuziñ ar stêr Oded. Ur vojenn a zo stag ouzh feunteun Sant Alour e Krec'h Erge. Enni e tro an dour da win un eur ar bloaz (sellit ouzh pennad Favé e B.A.F. 1896, p. 100).


Splann eo ster ar *Stank Ala(r)* d'an Ergeiz kozh ha trawalc'h eo goulenn gante da c'houzout. N'eo ket ar pezh o deus graet an Aotraouien Falc'hun ha Quentel war ar seblant, daoust dezho kinnig bep a zisplegadenn "skiantel" diwar al lec'h.

Hervez Falc'hen (1) e teufe *Stangala* eus Stank Alarc'h = Stank Alar = Stank Ala. E-barzh al lec'h gouez-se e vije an elerc'h o tiskuizhañ eus o beajoù.

---

(1) F. Falc'hun : Préface, nomenclature des hameaux écarts et lieux-dits du Finistère.





*An anvioù gant GUEN en Erge-Vras*

Hervez Quentel (1) e teufe eus "lec'h". Kinniget en deus un endroadur : Stanglec'h = Stanglac'h = Stangla(r) = Stangala(r).

Diskouez a ra splann an div skouer-mañ ne dalv ket ar boan duañ paper gant teoriennoù hep bezañ teurvezet dont war al lec'h rak emañ alc'houez meur a anv lec'h peurliesañ.

-- Stank ar C'hoat /stãŋkaɔat/ (Stank ar C'hoad)

-- Stank Luzigou /stãŋklýzi:gu/ (Stank Luzigoù)

Ur frankizenn an hini eo. Dont a ra an anv sur a-walc'h eus al lus a zastumer er c'hoadoù.

-- Stank Queau /stãŋkeo/ (Stank Keo), 1454 : *Stancqueau*, 1684 : *Stangeo*, *Stancqueau*.

Pe ur c'heo a vije eno pe an anv den Keo an hini eo.

-- Stank Venn /stãŋkeo/ (Stank Venn)

Troet eo e galleg "la Vallée Blanche". Sellit ar pennad da heul diwar-benn "Guen".

#### f) GUEN

-- Stank Venn

-- Parc Loch Guen

Stak tre eo an anvioù gant *guen* er vro vrezhoneg. Boas eur da droiñ anezho gant "blanc". *Stank Venn* zo deuet da vezañ "la Vallée Blanche" 'Circuit de la Vallée Blanche).

Gregor a dro *Canol Venn*, *Froud Venn* gant "canal blanc dont le fond est de sable blanc".

Trepos (2) en deus goulakaet e talve *guen* a-wechoù kement ha stêrig, दौरig, gwazh. Roiñ a ra e-leizh a skouerioù e-lec'h e c'hellfe *guen* kaout ar ster-se. Da glask sklaeraat ar gudenn em eus savet kartenn gant kement *guen* a zo meneget war roll ar parkoù.

Kentañ evezhiadenn d'ober eo emañ kazi holl ar parkoù-se war vord ar stêrioù pa n'eo ket tostik d'an eiennoù.

Pemp *menguen* a zo. Marteze ez eo mein gwenn an anvioù-se. Melloù roc'h gwenn (kouarz) a gaver stantik er vro.


*Guen* a vez implijet div wech gant ar ger-mell : *Brad ar Guen*, *Coat maes an Guen*. Ne zle ket bezañ ar *Guen* anv un den rak implijet e vez dalc'hmat ar rak-anv evit envel ur park : *Park Yann ar Gall* (Ar Gili Vihan), *Foennec Herve Gast* (Poullduig). Bez e c'hellfe *Guen* talvezout gwazh amañ.

*Guennou* a gaver ur wech. *Croas Guennou Tosta* ha *Croas Guennou Pella* a zo daou bark lec'hiet er *Stank Venn*. Eno ez eus dres div wazh-dour o vont d'an Oded. Bez e c'hell *Guennou* bezañ liester *Guen* = gwazh.

---

(1) Quentel : Sur quelques mots et toponymes bretons et celtiques. Ogam 1954.

(2) Trepos : la notation des toponymes bretons. A.B. 1953



Ar stummoù all emañ *guen* an anv gwan : *Ar Creac'h Guen*, *ar Run Ven*, *Roch Guen* pe *Roz huen*, *Parc ar Marc'h Ven*, *Stank Venn*, *Poullguen*, *Foennec Ven*, *Leurven*, *Tirien Guen*, *Liors an Id Guen*, *Groas Ven*, *Coat Guen*, *Parc Groas Ven*.

*Poull Gwenn* a zle bezañ keñveriet gant *Poull Du* moarvat. Evit ar re all ez eo iskis e vije ken gwenn-se ar vro. Perak e vije gwenn ar run, ar roz, ar stank, ar foennec, al leur, an tirienn, ar groaz, ar c'hoad hag all ? Petra a c'hell roiñ dezho ul liv gwenn ? Ar rev gwenn ?

*Roz Huen* a vez distaget /ru:zyen/ ha n'eo ket /ru:zvæn/ e-giz ma vije bet gortozet.

Koulskoude e oa anveet gwechall *Roch Guen*. Gant ur seurt distagadur e vije kentoc'h ar ger GOUENN. Gouennañ a dalv "se reproduire" ; hag eñ e vije lakaet loened da c'houennañ eno ? Ne ziskoul'n ket kudenn *guen* dre vras, forzh penaos.

Distaget e vije gwazhenn /gʷɛ:n/ er vro. Met lavaret e vez ar wazh /aʷɛ:z/ ha dianav krenn eo gwazhenn gant ar ster-se. Pe e vije *gouerenn* ?

Peuzalies e kaver *guen* e-unan. Setu un nebeut anvioù e Penn ar Bed : *Guenalegenn*, *Guenan*, *Guenarc'hant*, *Guen ar mear*, *Guenfrouf*, *Guenguerzit*, *Guenvenez*, *Guenvez*, *Creac'h ar Guen*, *Guennou*, *an Dour Gwenn* (Erge Vihan), *Kerguen*, *Keraguen* (div gêr tost eus St Ivi. Petra a dalv *Guen* el lec'hioù-se ?

#### g) AR STERIOU

-- Odet (Oded), 1022-1058 : Oded D.I.K.

1090 : Hodeth D.I.K.

1228 : Odeth D.I.K.

1302 : Odet D.I.K.

1636 : Penn o detz (Albert Le Grand)

-- Jet (Ar Jed), 1302 : Jet

Meneget eo bet *ar Jet* gant Tanguy o talvezout kement ha Yet (guet, endroit élevé). *Beg Jet*, ur gêr a Elliant eo ar skouer roet gantañ. Emichañs ne ouie ket e oa ar stêr *Jed* an hini a oa o redek ouzh troad ar gêr-se. E-leizh a gêrioù hag a barkoù a gaver penn-da-benn ar stêr, ganto ar ger *Jed* : *Stank Jed* (Erge, Elliant, St Yvi), *Park Jet* hag all.

#### h) AR RE ALL

-- Parc Feunteun /park'fɛtɛn/ (Park Feunteun)

-- Parc ar Fanquic /park'fankik/ (Park ar Fankig), 1678 : *Parc an Fanquic*

Fank a zo bouilhenn. Ur park *ar Poullfrank* a gaver e Kerveadi. Marteze e vije amañ un anv-den.

### 3 - ANVIOU O TENNAN D'AN GWEZ

#### a) ANVIOU GANT BOD

-- Boden /bu:n/ (Bodenn), 1544 : *boden pridiry an laez*, 1681 : *boden*, 1685 : *botden*  
Stumm unander *bod* e tle bezañ. Pa gaver alies anvioù-lec'h *bodic*, *bodan* stummet a-ziwar *bod* e kaver kenkoulz all *bodenn*, *bodennec*, *bodennou* stummet a-ziwar *bodenn*. *Botden* a seblant bezañ ur fazi rak n'eo bet kavet nemet ur wech.

Er XVIvet kantved e kaver dalc'hmat *Boden Pridiry an Laez*. *Prederi* (méditation, pensée) a zo meneget e kement geriadur, hag eñ *pridiry* war ar re goshañ.

Dre benn da hemañ eo *bodenn* gant ar ster : lec'h anneziañ, lec'h gwareziañ a zo amañ sur a-walc'h. Roiñ bod da unan bennak a zo degemer anezhañ en e di. Posubl eo a vije bet ul lean pe ur penitiour o tont eno da anneziañ gwechall gozh.

-- Bohars /boʁars/ (Boharz), 1540-1682 : *Botgarz*

Garth=haie, talus élevé garni de buisson. Setu displeget gant Loth ar ster he deus hiziv c'hoaz. E Kembraeg e ro Davies ar ster : hill, promontory, enclosure. Tu zo d'en em c'houlenn ha ne vije ket *garz* gant ar ster-se amañ. Lec'hiet eo dres war benn *Menez Kerdevot* just e-kichen *Penn ar Menez*. Diouzh un tu all an daou c'her *bod* ha *garzh* a ya mat-tre a-gevret.

-- Bossuzit /boʁsydik/ /boʁsyzik/ (Bossuzig), 1325 : *Botsinsic*, 1540-1617 : *Bossieusic*, 1540 : *Botsieusic*, 1643 : *Bosseudic*, *Bodseusic*, *Bodseudic*, 1768 : *Bosuzit*, 1682 : *Botsuisic*.  
Stummoù skrivet nevez a-walc'h a zo gant an dibenn -it. Distaget e vez hiziv gant un -ik. Ma 'z eo *bod* a zo en tamm kentañ, eo diaes termeniñ an eil tamm. N'eus anv-den ebet da dostaat ouzh *Siusic*, *Sieusic*, *Seudik*. Meneget eo *Bodsinsic* en un diell eus Diellaoueg Kemper, e-lec'h e kaver Erge Gaberic evit ar wec'h kentañ. ur chapel a oa e *Bossuzig*, unan kozh-tre rak diskaret e oa dija e-pad an dispac'h bras.

#### b) ANVIOU GANT KOAD

N'eo ket stank an anvioù gant *Koad* war ar barrez. War bouez unan emaint holl nevez tre. Peurliesañ eo anv ur park pe ur c'hoad a zo bet roet d'un ti nevez savet.

-- Cadigou /aʁqadigu/ (Ar C'hoadigou)

Koadigou. Skrivet eo gant ar fazi war ar c'hadastr ha war roll an I.N.S.E.E.

-- Coat Chapel /kɔa:t ʃapɛl/ (Koad Chapel)

Chapel Sant Joachim an hini eo amañ. Ne chom roud ebet diouti nemet el lec'h-anvadurezh, (sellit ouzh Sant Joachim).

-- Coat Niverrot / (Koad Niverrot)

Ne vez kavet nemet war roll an I.N.S.E.E.. Ur c'hoad e-kechen *Kêr Niverrot* an hini eo.

-- Coat Piriou /kɔa:t pirju/ (Koad Piriou), 1683 : *Coat Piriou*

Un anv den eo Piriou a vez kavet alies-tre an anvioù lec'h : *Rospiriou, Mespiriou, Garspiriou, Kerbiriou ...*

-- Penn ar Hoat /penaɣɔat/ (Penn ar C'hoad)

*Penn ar C'hoad* ne vez kavet nemet war roll an I.N.S.E.E.

-- Stank ar Hoat

*Stankenn ar C'hoad*. Ne vez kavet nemet war roll an I.N.S.E.E.

k) KILI

*Kili*

Ken en henvrezhoneg (Kili), ken e Kembraeg (Celli, y gelli) e vez implijet *kili* gant ar ster koadig, brouskoad. Peder *Gili* a zo en Erge, an holl anezhe o vezañ meneget e 1540 pe a-raok.

-- Guilly Vihan /gíliví:ɛn/ (Ar Gili Vihan), 1458 : *Guilli Bihan*

-- Guilly Vras /gílivra:z/ (Ar Gili Vras), 1458 : *Guilli Vras*

*Ar Gili Vihan, ar Gili Vraz*, div gêr tost an eil ouzh eben.

-- Croissant Gully /krɔasent gili/ (Kroaz-hent ar Gili)

Kroaz-hent an daou hent o vont d'an div Gili an hini eo.

-- Lost ar Guillec /lɔstá:gilek/ (Lost ar Gileg), 1540 : *Lostanguillec*

Kavour a reer amañ KILI + dibenn ger EG e giz vez kavet *koadeg, kelenneg* hag all. Sur a-walc'h e oa ar Gileg brasoc'h eget ar Gili. Kent e oa ur c'hoad bras aet tamm-ha-tamm da Gili pa zo bet savet kêrioù ennañ. Lost a dalv ar pezh o chom eus ar Gileg.

-- Quilli Huec /ki'lyɥɛk/ (Kilihueg), 1540 : *Quylly huezec* ; 1677 : *Quiliuec*, 1685 : *Quillihuec*  
Gwezeg a vije marteze en eil tamm.

-- Quilli Houarn /kilíyuar:n/ (Kilihouarn), 1540 : *Keligouarn, Geligouarn, Quilhouarn* ; 1584 : *Quelechouarn* ; 1628 : *Glihouarn* ; 1633 : *Quilhouarn*, 1636 : *Kili Houarn*, 1668 : *Guilli Houarn*

Hervez Tanguy e vije houarn e-barzh an douar. Bez zo tri *Quillihouarn* e Penn ar Bed. Bez zo ur park anvet *Parc an Ty Houarn* e kichen *Quillihouarn*. E Baod : *Coët-er-Houarne*.

Koulskoude e tispleg fraezh ar stummoù koshañ n'eo ket ar ger "houarn" met "gouarn" a zo en eil lodenn eus ar ger. Reizh eo ar c'hemmadur G C'H war-lerc'h KILI.

Emañ *Kilhouarn* war vevenn ar c'hoad bras a ya da heul ribl ar stêr Oded, er stank Sant Alar. He ne vije ket aze ur c'hoad miret d'ar sant, ur seurt neved ?

d) AR RE ALL

-- Balannou /bálānu/ 1540 : *Banazlou*

E Krennvrezhoneg ez eus *Balazn*, *Banazi*, daou stumm par. Balan o vezañ treuzlec'hiadur banal. *Banaleg* a gaver dindan ar stumm *Banadluc* (1030), *Banazleuc* (1368).

-- Garsalec /garsya:lɛk/ (Garzhaleg)

Garzh Haleg. E 1835 e oa *Garzh Haleg vihan* ha *Garzh Haleg vras*. Edod o c'hortoz ul lec'h dourek amañ e-lec'h e kresk stank an haleg ; ha padal n'emañ ket.

-- Lenhesk /lɛn'ɛsk/ (Lennhesk), 1834 : *Lenhech*

Lenn Hesk Posubl eo e vije ul lenn aet da hesk. E 1835 e *Kejenny* (Ti-Bur bremañ) e oa div lenn-besked aet da get an deiz a-hiziv.

Kenkoulz e c'hellfe dont an anv eus hesk, ur yeotenn a droc'h a gaver war vord ar stêrioù er pradeier, galleg : Lesche ; latin : Carex. Ar "ch" a gaver e dibenn ar ger e 1835 (n'eus meneg ebet eus al lec'h araok) a c'hell bezañ un doare gallek da aroueziañ "k". Menegomp nemestra ar c'herneveg "heschen" hag ur stumm "Penn hischin" e-barzh Diellaoueg Landevenneg, a c'hellfe "hech" bezañ kar (un aspadenn ?) eus ar stumm-se.

-- Parc al Land /parklān/ (Park Lann), 1678 : *Parc an Lan*

-- Quellenec Izella /kelɛnek/ (Kelenneg), 1540 : *Quellenec*, 1680 : *Quellenec iselaff*  
*Kelenn* + EG (dibenn ger o vezhañ ez eus ur stropad). Ur park e-kichen a zo e anv : *Coz Guelen Creis*.

-- Stank Luzigou /stāŋklýzi:gu/ (Stank Luzigoù)

Ur frankizenn eo e-barzh ur c'hoad lec'h emañ stank al lus emichañs. *Coat Luz* a gaver e Gwinevez, *Coat Luzec* e Pleiber-Krist.

-- Vrugic /avry:gik/ (Ar Vrugig)

Anv nevez diwar ur park gwechall e Kervegenn. Skrivet oa *ar Vrugic* war gadast 1835.

## 4 - ANVIOU GANT KER

### a) AN ANV KER

30% eus an anvioù-lec'h studiet ganeomp a ao dezho anvioù gant KER. E 1834 eo 40% eus an atantoù a zo gant an anv KER. En o zouez m'eus nikun a hañval bezañ gant ar ster "castrum" : kastell kreñv pe kêr vogeriet a gaved gwechall gozh e-barzh Caermarthen e Bro Gembre pe Ker Ahez e Breizh.

Aet eo da get ar ster-se tro an Xvet kantved ha diwar neuze ez eus bet krouet kêrioù pe atantoù dezho un ti hepken da zigentañ, emichañs. Gant kresk ar boblañs en XIIIvet kantved ze eus deuet ur bern eus an anvioù-se. Ha roet zo bet dezho anv an ozhac'h evit o disheñvalaat. Setu perak emañ al lodenn vrasañ anezho savet gant KER + anv den. Un nebeudig a zalc'h d'un anv all *Ker ar Penn Sal* da skouer, ha nebeutoc'h c'hoazh a zo gant KER + anv gwan *Kernevez, Kervihan ...*

### b) KER + ANV DEN

-- Kerampeillet /kɛrˈpiːlɛt/ (Ker Peilhed)

Diwar c'hallekadur e teu an M dirak ar P. Ne glever ket ken ar ger-mell hiziv pa zo unan en anv den. Miret eo ar c'hemmadur e-giz pa vije aze.

-- Keranna /kɛˈrana/ (Ker Anna)

N'eus ket eus ar ger-se e 1834. Ur rak-anv e tle bezañ Anna. Un nebeut anvioù-lec'h stummet nevez 'zo a zo war ar memes patrom : *Keryann, Kerjañ, Kerlouis ...*

-- Keranroue /kɛˈruːe/ (Ker 'Roue), 1540 : *Ker an roy* ; 1685 : *Ker an Roue*

Iskis eo e kaver *An Roy* e 1540. Hag e vije taol-esa ur gallekadur eus perzh un noter bennak. D'ar mare-se eo bet lakaet "salle verte" e-lec'h *Sal Glas*.

-- Keranroux /kɛˈruːz/ (Ker 'Rouz), 1685 : *Keranrou*

-- Kerautret /kɛˈrɔːtɹɛt/ (Ker Aotred)

-- Kerdiles /kɛˈdɪlɛs/ (Kerdilez), 1684 : *Kerdilez*

Meneget 'zo un anv den DILES e Diellaoueg Kemper ha Redon. Mag e vije DILES emañ e rankfer klevout ur c'hemmadur D/Z ha oadal n'eus ket deus outil. TILES e tlefe bezañ neuze.

-- Kerdohal /kɛrdɔːal/ (Kerdoc'hall), 1682 : *Querdochell*, 1683 : *Kerdochell*, 1685 : *Kerdochall*  
Da dostaat e vije DOC'HALL ouzh an and-den DOHOLL, DOHOLLOU. Koukousde n'eus ket a gemmadur D/Z. TOC'HALL, TOC'HELL a zle bezañ ar stumm orin. Ur verb "toc'hellañ" a zo o talvezout "pasaat".

-- Kerdudal /kɛrzyːl/ (Ker Zudal), 1685 : *Kerdudal*

Ur park *Tudal* a zo meneget war vammennoù ar c'hadastr kozh. Parrez Landudal a zo sko ouzh an Erge Vras. Mag eo emañ an anv-den Tudal n'heller nemet souezhiñ gant ar c'hemmadur T/Z.



- Kergamen /kɛ́rgãmen/ (Kergamen), 1540-1682 : *Kergamon*  
E-barzh bro Porzh-Loeiz e kaver an emdroadur-mañ : *Kerguemenan* 1457 *Kergamenan* *Kergamon*. Tud a zo o anv CAMENEN a c'hellfe bezañ stumm kentañ KAMON, KAMEN. Marteze e teufe an anv-den HAMON eus ar memes gwrizienn : ar C'hamon.
- Kerganou /kɛ́rga:nu/ (Ker Ganou), 1677 : *Kerganou*  
Un anv-den anavezet mat e stummoù koshañ : CATHNOU (Plouganou = Ploi Cathnoue e 1040) ; *Kergaznoue* e 1427 (Larguillère).
- Kergaradec /kɛ́rgáradɛk/ (Ker Garadeg), 1544 : *Kercaradec*, 1677 : *Kergaradec*.
- Kergoant /kɛ́rgo:ãn/ (Ker 'Gwan), 1458-1684 : *Kerangoan*, 1678 : *Kerangouan*, 1682 : *Ker an goann*, 1688 : *Kerangoant*  
Deuet eo ar stumm skrivet *koant* war an diwezh. Ne glever ket an T dibenn-ger gat an dud. Bez e tle bezañ *ar Gwan* ster an anv-den. *Koant* en dije roet *ar C'hoant* forzh penaos.
- Kergonan /kɛ́rgõ:n/ (Ker Gonan), 1539 : *Ker Conan*, 1540 : *Ker Gonnán*, 1678 : *Ker Connán*, 1682 : *Kergonan*
- Kerhamus /kɛ́rỹãms/ (Ker 'C'hamus), 1682 : *Kerancamuz*
- Kerho /kɛ́rỹɔ/ (Ker C'ho), 1666-1681 : *Kergo*, 1688 : *Kergoff*, 1705 : *Quergoff*, 1666-1740 : *Kerho*  
Da zisheñvalaat eo *Kergoff* ouzh *Kerangoff*. Ar c'h-"kov" a gaver amañ a zo da dostaat ouzh re Roscoff, Plogoff, Trogoff.
- Keristin /kɛ́ristin/ (Keristin), 1540 : *Keryestin*, 1678 : *Kergestin*, 1682 : *Keristin*  
JESTIN eo an anv-den kevredet gant KER. An embroadur G Y I eo an hini a gaver e-barzh ELGENT ELYENT ELIANT.
- Kerjean /kɛ́rzã/ (Kerjan), 1683 : *Kerjan*
- Kerjenny  
Aet eo an anv-se da get, *Ti-Bur* en deus kemeret e blas. Dibar eo an anv-se, ul liv saoz warnañ.
- Kerlanic /kɛ́rlãnik/ (Ker Lanig)  
Nevez krouet eo bet an anv-se. Moarvat *Ker-Alanig*.
- Kerlies /kɛ́rlijɛs/ (Kerlies), 1541 : *Parc Ker Alias*  
Meneget eo *Parc Ker Alias* en diell a vez kavet en digoradur. Moarvat eo tost an anv-se eus HELIAS, ELIES.
- Kerlouis /kɛ́rlqi:/ (Kerlouis)
- Kermorvan /kɛ́rvɔavãn/ (Ker Vorvan), 1541 : *Kermorvan*
- Kermoysan /kɛ́rvɔ:zõn/ (Kervoazan), 1561 : *Kermissan*, 1678 : *Kermoisan*
- Kernaon /kɛ́rnãz/ (Kernaon), 1682 : *Kernaom*, 1684 : *Kernaoff*, 1688 : *Kernaon*
- Kerongnes /kɛ́rũãna/ (Kerongnes)  
Hervez Gourvil a vije un distresadur eus Ker Omnes.

-- Kerourvois /kɛ́ru:rv/ (Kerurvoaz), 1544 : *Kerurgoaz*, 1684 : *Kerurvoaz*  
Emdroadur reizh URGWAZ URWAZ. Ar /W/ o vezañ distaget /V/ er vro.

-- Kerourvois-Kerdevot

Div Ger-Urvoaz a zo en Erge. Houmañ a zle bezañ nevesoc'h. Staget eo bet outi anv he zrev, hini Kerdevot.

-- Kerouzel /kɛru:zɛl/ (Ker Rouzel)

-- Keriou - Keriou Vihan /kɛ́riju/ (Ker Riou - Ker Riou Vihan)

-- Ker Saux /kɛ́rzo:z/ (Ker Saoz), 1561 : *Quer an Saux*, 1684 : *Ker an Saoz*

-- Kerveguen /kɛ́rvɛgen/ (Ker Vegenn), 1458 : *Kergueguen*, 1679 : *Kervegen*  
Bez e kaver adarre GW W : *Ker Gwegen Ker Wegen*, /W/ o vezañ distaget /V/ er vro.

-- Kervoreden /kɛrvɔrɛ:ɔden/ (Ker Voreden), 1678 : *Kervoredan*, 1684 : *Quervoredan*  
Bez' zo amañ un hen-anv : GWOREDAN, GWORETAN.

-- Keryann /kɛ́rjãn/ (Ker Yann)

k) KER + ANV - GWAN

-- Kerdevot /kɛ́rzɔ:t/ (Ker Zevot), 1540 : *Kerdevot*

Sellit pelloc'h ouzh ar pennad "Intron Varia Kerdezot" - Anvioù relijiel -

-- Kerhuel /kɛ́rhyɛl/ (Ker Uhel), 1679 : *Kerhuel*

Gant an diouer a stummoù koshoc'h ez eo diaes gouzout hag un anv-den e vije petramant : kêr war an uhel.

-- Kernevez /gɛ́rne:ves/ (ar Gêr Nevez)

-- Kervian /kɛ́rvie:n/ (Kêr Vihan), 1678 : *Kervihan*, 1682 : *Kervyan*

Ma vije an anv-den e c'hortozfemp kentoc'h *Kêr ar Bihan*.

d) KER + ANVIOU ALL

-- Kerampensal /kɛrpɛ̃sɛl/ (Kêr Penn Sal), 1643 : *Guer an pensal*, 1682 : *Quer an Pensall*  
*Kêr ar Penn Sall*. Emañ dres e lec'h ma echu douaroù maner ar *Sal C'hlas*.

-- Kerangueo /kɛrɔ̃gɛɔ/ (Keroñgeo), 1636 : *Kerougueau*, 1669 : *Kerougeau*, 1681 :  
*Keranqueau*, 1740 : *Kerouqueau*

Daoust d'ar stumm skrivet nevez 'zo n'eo ket anat e vije amañ Kêr ar C'heo, na pa vije an anv-den na pa vije KEO = site où on aurait découvert des abris souterrains (Gourvil). An distagadur hag ar stummoù kozh a ya a-enep d'an displegadur-se. Goulakaat a c'heller GOU GEO : KER - GOU - KEO *Kerhougeo Kerougeo*. Ur gêr *Gousgastell* a zo dres e-tal war c'hlann an Oded.

-- Kerberan /kɛ́rbɛrn/ (Ker Beran)

Bez e c'hell *Peran* bezañ anv un den. Hervez Gourvil e talvezfe Penn-Rann, ur rann o vezañ un tachad douar bihan. Dres, er ger nesañ (Grifonez), ez eus ur *Pradic ar Ran*. Siwazh deomp n'heller ket anataat ur Kêr Benn Rann gant an diouer a stummoù kozh. Muioc'h a chañs zo e vije ar ran-se al loen a zarempred ar gwazhioù-dour.

-- Kerdales /kɛ́rdales/ (Kerdalez), 1682 : *Kerdalast*

Da dostaat eo ouzh Kerdal, Kerdalo, Kerdalec. Betek gouzout n'eus env-den ebet TALES, TALAST.

-- Kerelan /kɛ́rɛːã/ (Kerelan)

N'eus roud ebet eus *Kerelan* en dielloù, er XVIIvet kantved zoken. N'heller tostaat an anv nemet ouzk *Kerelou*.

-- Kerellou /kɛ́rɛːlu/ (Kerhelou), 1679 : *Querhelou*, 1683 : *Kerhelou*, 1685 : *Kerelou*

Pevarzek *Kerellou* a zo e Penn-ar-Bed. Kinnig a ra Gourvil e vije an eil tamm an anv-den HAEL, HAELOU. Koulikoude e ya stummoù kozh all a-enep d'an displegadenn-se : *Kerguellou* (1326) e Ploneour ha koskoc'h c'hoazh *Caeraethlou* (1250). E Dielloù Illizoù Kemper e kaver anezho. E-leizh a dud zo anvet GELLEG, GELLOU. *Kerguellou* a yafe da *Kerhellou* ha padal *Caeraethlou* a yafe da *Kerezlou Kerelou*. Lakaat a ra war ziskouez n'eo ket HAEL eo an eil tamm eus an anv-lec'h.

-- Kerfort /kɛ́rfoːr/ (Kerfor), 1540 : *Kerfors*, 1685 : *Kerforz*

Fors a gaver e meur a anv-lec'h : *Keranfors* (Gwimiliav), *Fors Quilly*, *Fors Luizec* ... Hervez Gourvil e vijent lec'hioù-difenn ar grenn-amzer. Ur maner e oa *Kerfor*, setu n'eo ket dibosubl e vije ar gwir gantañ.

-- Kerfres /kɛ́rfrɛːz/ (Kerfrez), 1458 : *Kerfrès Huellaff*, *Kerfrès Ysellaff*, 1682 : *Kerfres*

Ne seblant ket e vije *Fres* anv un den. N'emañ ket kennebeut ar gerioù FRAEZH na FRAEZ evit displegañ anv ar gêr-mañ.

-- Kerlavian - Kerlaviou /kɛrlavijɛn/ /kɛrlavju/ (Kerlavian) (Kerlaviou), 1677 : *Kerlevyen*, 1678 : *Kerlavian*, 1681 : *Kerlavyou*

Meur a anv-lec'h a zo da dostaat ouzh an daou-mañ : *Kerlaveau* (Elliant), *Kerlavezou* (Louargat), *Kerlaveo* (Edern), *Kerleviou* (Plouezal).

Da zisplegañ *Levezou* e ya Gourvil gant Glev-Bidoe (Cart. Redon). Bez e c'hell an anv-den GLEAU = GLEV kaout deveradurioù "*Glevien*" "*Glevioù*". Gant ar c'hemmadur ez eus tu martezeiñ *Ker-Glevien Kerlevien* e-giz eo aet *Ker Gloagen Kerloegen*.

-- Kerleur /kɛ́rlœːr/ (Kerleur)

Aliesoc'h e kejer gant *Leurger*. Al LEUR (Kembraeg : llawr) a vez graet eus un dachenn blat lec'h oa graet an dornañ da skouer. Hervez Brengar (anvioù lec'h Sant Vig) hi a vije ivez ul lec'h digoadet ha gounezet abred-tre. N'eo ket *Kerleur* kozh a-walc'h evit mont gant ar ster-se.

-- Kernaou /kɛ́rnaw/ (Kernaou), 1541 : *Kernaou*

Emichañs Kêr lec'hiet war un diribin, un naou.

-- Kernilis /kɛ́rniːlis/ (Ker 'n Iliz)

-- Kernoas /kɛ́rnɔːz/ (Keroaz), 1678 : *Kernoaz*

Na *Noaz* e vije an anv-den ? N'emañ ket war roll Gourvil.

-- Kerveady /kɛ́rvɑ:i/ (Kerveadi), 1682 : *Querveadic*, 1684 : *Kerveady Kerveadou*, *Kerveadic* a zo anvioù tud anezho. *Caer-Beat*, ul lec'h eus Kroazon, a zo meneget e Diellaoueg Landevenneg. An IC o vont da l a gaver ivez e-barzh *Kutuillic Koutili*.

-- Kerveil /kɛ́rvɛʎ/ (Kerveilh), 1685 : *Ker an veill*, 1677 : *Ker an veille*  
N'eus stêr ebet e-kichen. Hag ur veilh-avel e vije ? Un anv-den ?

-- Kervern - Kervernic  
Sellit ouzh al lodenn anvioù o tennañ d'an dour.

-- Kervinic /kɛ́rvɪnik/ (Kervinig), 1682 : *Keravinic*  
Ul lec'h Binic zo e bro Sant Brieg. N'emañ ket *Binic* war roll an anvioù-tud kennebeut.

-- Kervreyen /kɛ́rvrɛɲ/ (Kervreyen), 1681 : *Keranvreyen*, 1682 : *Keravrein*  
Moarvat un anv-den

## 5 - ANVIOU GANT TI

Emaint bet savet an holl anezho abaoe 1835. War bouez daou emaint graet gant TI pe TI NEVEZ + anv ur Gêr.

-- Ty Bur /tíbyr/ (Ti Bur)  
Kemeret en deus plas *Kerjenny* da envel ur maner.

|                        |                        |
|------------------------|------------------------|
| -- Ty Coat             | Ti Koad                |
| -- Ty Kerdevot         | Ti Kerzevod            |
| -- Ty Kerveguen        | Ti Kervegenn           |
| -- Ty Nevez Castel     | Ti-nevez ar C'hastell  |
| -- Ty Nevez Kerfort    | Ti-nevez Kerfor        |
| -- Ty Nevez Kergaradec | Ti-nevez Kergaradeg    |
| -- Ty Nevez Kerlies    | Ti-nevez Kerlies       |
| -- Ty Nevez Kernaou    | Ti-nevez Kernaou       |
| -- Ty Nevez Kerourvois | Ti-nevez Kerurvoaz     |
| -- Ty Nevez Kerveguen  | Ti-nevez Kervegenn     |
| -- Ty Nevez Lezouanach | Ti-nevez Lez Houanac'h |
| -- Ty Nevez Mezanlez   | Ti-nevez Maez-an-Lez   |
| -- Ty Nevez Penmenez   | Ti-nevez Penn ar Menez |
| -- Ty Saint-André      | Ti Sant-Andre          |

## 6 - AN HENTOU

Be' int holl anvioù nevez deuet abaoe 1835. Graet e vez *Hent meur* eus an daou hent roman a gase eus Kemper da Garaez ha deus Kemper da Elliant.

-- Pen ar Garn /penáɡarn/ (Penn ar Garn)

Penn ar Garront. Kembraeg : Pen ffordd (Flintshire Place Names), Pen y ffordd = top or end of the road.

-- Pen Carn Lestonan /penkarnleštãn/ (Penn Karn Lestonan)

O studiañ ar ger CARN a vez kavet alies en anvioù-lec'h hor bro, n'eus bet gwelet gant Gourvil ha Tanguy nemet ar ster istorel : KARN = CAIRN a vez troet dalc'hmat gante gant "bern mein". Anat eo n'eus bet morse tamm karn ebet e-barzh *Penn Karront Lestonan*. *Karront* a vez distaget /karn/ dre Gernev-lzel a-bezh. Heussaff a ro distagadadur *Karront ar Groaz* /karníꞤrœis/ (1).

E Kersaoz ez eus ur park *Penn ar Garont*.

-- Croissant Guilly = Kroaz-hent Gili

-- Croissant Vras = Kroaz-hent Vras

Re alies ez eus bet "arabizet" hor c'hroazhentoù dre ar vro, setu div skouer evit ar barrez. E kembraeg e kaver Croesffordd = crossroads = kroazhent.

-- Pen allée Congallic (Penn Ale Congalig)

## 7 - ANVIOU ALL

-- Bigoudic /bíɡɔːdik/ (Bigodig)

N'eus ket eus al lec'h-se e 1835 nemet ur *stanc ar bigodou* a oa perc'hennet gant KERHO. E 1541 e vez meneget ur *Pont bigodou* en un diell-skrid. Anv un den pe ur familh a c'hell bezañ (BIGOT). N'eus abeg ebet da grediñ e teufe eus Bigoudenn, Bigouter.

-- Drohen /'droːɛn/ ('Dro Hent)

N'eus ket eus al lec'h-se e 1835. Talvezout a ra evit AN DRO HENT sur a-walc'h. Emañ dres e-lec'h e tro an hent da vont da Valanou.

-- Coutilly /kuːtíli/ (Koutili), 1458-1540 : *Cutullic*, 1666 : *Cutuillic*, 1680 : *Guteuillic*, 1683 : *Gueut uilli*

Bez' zo ur *Gwaremm Cutuillic* e Penn ar Menez. Hervez ar stummoù kozh n'heller ket gwelet amañ ur "Cwm Tylo, Cwm Tyleri" e-giz e kaver e kembraeg.

N'eo ket ar wezenn DIH nag an ILLI eo a zo dibenn an anv-lec'h. Ur anv-den e tle bezañ.

Bez' e kaver tud anvet CUTUILL, CUTUILLIC, CUTULIC, CUTULLIC. Gwanadur IC I e dibenn ar ger adal fin ar XVIIvet kantved a zeu eus ar pouez-mouezh kreñv-tre war an eil sillabenn ziwezhañ.

---

(1) A. Heussaff

N'eo ket ar wezenn DIH nag an ILLI eo a zo dibenn an anv-lec'h. Ur anv-den e tle bezañ. Bez' e kaver tud anvet CUTUIL, CUTUILLIC, CUTULIC, CUTULLIC. Gwanadur IC I e dibenn ar ger adal fin ar XVIIvet kantved a zeu eus ar pouez-mouezh kreñv-tre war an eil sillabenn ziwezhañ.

-- Gongallic /gɔ̃ga:lik/ (Gon Gallig), 1540 : *Gonez an gallec*, 1678 : *Gongallic*

Gallic, *an Gallec*, a hañval bezañ un anv-den. An tamm kentañ avat, n'heller ket tostaat anezhañ ouzk KON, KONOCH. N'emañ ket war an uhel da gentañ ha d'an eil ne gaver nemet stummoù GON, GONEZ. Ar gouent a vez distaget / / er vro, met n'eus netra evit roiñ deomp da grediñ e vije bet ur gouent dre aze.

-- Griffones /kʁefɔ̃nes/ (Griffonez), 1680 : *Griffonez*, 1682 : *Griffounez*

Setu ur gêr dibar hec'h anv. Stag eo e gwirionez ouzh ur vojenn a gonter c'hoazh en Erge. Le Guennec en e "Vieux souvenirs bretons" en deus roet deomp un tañva eus an istor-se. Bez e vije bet ur griffon eno o lojañ e-barzh ur c'hev ha rankout a reer roiñ deszhañ bep miz ur plac'h ugent vloaz da voued. Ur wech bennak eo bet lazhet gant un den yaouabk ne oa ket evit gouzañv e yafe e vuiañ karet gant al loen.

Kavet 'vez ar ger GRIFFON e meur a c'heriadur :

|                     |                                     |  |
|---------------------|-------------------------------------|--|
| Geriadur<br>Istorel | : <i>griffon -ed</i>                | = griffon, animal fabuleux   |
| Catholicon          | : <i>griffon</i>                    | = latin griphes  |
| Gregor              | : <i>gryffoun</i>                   | = griffon, vautour fauve   |
| -                   | : <i>griffon -ed</i>                | = griffon, oiseau de proie semblable à l'aigle   |
| Geria.<br>Prifysgol | : <i>Griffwn, griffwnt, griffon</i> | = anifail chwedlonol achanddo ben, gylfin, adenydd a chrabanau eryr ond corff lew ... (aneval mojennel hag en deus ur penn, divaskell ha krabanou erer met korf ul leon) |

Un anv-den GRIFFON a zo meneget gant Gourvil. N'emañ ket anv al lec'h diwar un anv-den amañ met diwar ar vojenn hep mar. An dibenn -EZ a vije kentoc'h ul liester eget ur merk benel. Merzout a ranker c'hoazh kaletadur G/K dindan levezon an F kalet.

-- Le Lec, Le Lec Nevez /lek/ /lek̃neṽ/ (Al Leg) (Al Leg nevez), 1458-1639-1677 : *Lehec*, 1678 : *Lec*, 1680 : *Leec*

Meur a lec a gaver dre barrezioù Penn ar Bed : *Lec* (Gwiler Gwaien), *Lecq* (Kermenven), *Leck vian* (ar Yeuc'h), *Kerlec* (Banalec), *Creac'h an Lec* (Kastell Paol), *Lehec* (Kerrien).

Parkoù perc'hennet gant kêrioù nesañ an div *Leg* zo ganto ivez an anv *Lec* : *Parc Lec*, *Parc Lec bihan*, *Parc Bras Lec*, *Le Lech Stang Odet*. Ar CH-mañ a vez distaget /K/ ivez.

Diskouez a ra ar stummoù kozh un emdroadur *Lehec Leec Lec*. N'heller nemet goulakaat ur stumm koshoc'h *Lehec* da zisrannañ e lec'h + eg.

Diaes a-walc'h eo gwelet amañ al LEC'H anavezet mat a gaver e PELEC'H, ANV-LEC'H hag all, ul LEC'H all a vez meneet er geriodurioù :

Troude : *Lec'h, lac'h* = grosse pierre plate et élevée de terre sous laquelle on peut se mettre à l'abri.

Le Pelletier : *Liac'h, leac'h* = En Haut Léon on donne ce nom à certaines grandes pierres plates sous lesquelles on peut être à couvert et qui donne lieu à des fables parmi les paysans.

Ur ger *llech* a zo e kembraeg par e-keñver ar ster gant ar ger iwerzhonek *leac, lic, liag*. Displeget eo gant Davies (Flintshire Place Names) evel-mañ : *slate, slab, stone tablet*. *LLECH seems to be frequently used to signify a grave stone, a sepulchral slab* (Mein-glaz, plakenn vein-glas pe vein. Alies e vez implijet llech evit maen-bez).

Sed ar ster a vez displeget er "Geiriadur Mawr". Ouzhpenn ez eus un henger *llech* a dalv kement ha *llechfa*, *cuddfan* (kuzhva) pe *lloches* (*amddifynfa*) lec'h difenn. Marteze eo ar ster-se e ranker klask an displegadenn. *Leg* a dalvefe neuze bod, lec'h-repu. Ar stummoù *Lehen*, *lehec* a vije par da boden, bodec.

-- Le Melennec /avelɛnɛk/ (Ar Veleneg), 1458-1540-1643 : *Melenec*

Div *veleneg* a gaver nemetken e-touez kêrioù Breizh. unan en Elven hag eben en Erge Vras. Evite da vezañ rouez n'eo ket anatoc'h o ster. Ha koulshoude e kaver liesgwech ar ger MELENEG er geriadurioù.

Ul lapous eo ar MELENEG (galleg : verdier).

Roiñ a ra Grégoire de Rostrenen ar stummoù *Melenecq*, *Meleneguet*. Pelletier a ro an hevelep re : *Melennec*, *melennoc*, *melenneguet*. Div skouer a gaver e geriadur Ernault : *An neiz Meleneg* (Poullon), *ar Meleneg* (Pleudaniel). Ar Meleneg o vezañ gourel n'hell ket talvezout amañ.

Un den melen a vlev eo ivez ar meleneg : blondin eo a talv hervez Gregor, roiñ a ra ivez al liester "melenneyn". Bez e kaver tud o anv MELENEC. Dre m'eo gourel nemetken n'eus abeg ebet da grediñ e talvezfe evit displegañ anv ar gêr. *Prad maez Meleneg* a zo unan e-touez parkoù Mezanlez. Anv an den eo sur a-walc'h, e-giz e kaver *maez Gloaguen*, *maez Autret* war gêrioù all ar barrez.

Div blantenn a vez graet *meleneg* dioute ivez : *meleneg*, *melion* troet gant Ernault : minette dorée, luzerne lupuline. Ur seurt geot gall gouez a gresk stank a-walc'h er parkeier gant bleunioù melen bihan.

Er vro n'anavez an dud nemet *melened* a vez graet oute chrysanthèmes des moissons e galleg pe marguerites dorées. *Melenik* eo ar stumm a ro Esnault en e c'heriadur.

Hervez an dud koulskoude ez eo *Ar Veleneg* un douar goloet a vleunioù melen (lann, balan, melened hag all ...) Diaes eo kompren, diouz un tu all, perak e vije bet roet un anv ispisial *Meleneg* pa z'eus kement a lann hag a valan war gement kêr a zo er gumun. Marteze eo bet ul lec'h difraostet abretoc'h e-touez ar c'hoadoù ?

Da gas da benn ar studiadenenn-mañ menegomp kudenn *melenco* a gaver en ul lizher a-berzh ar Pab Gregor XI er bloavezh 1373 (1). Kaoz zo ennañ eus iliz MELANACO e-barzh eskopti Kemper : *infra limites parochialis ecclesiae de Melenco consopitensis diocesis*. Dindan anv Intron Varia Rokamadour eo an iliz-se, ar pezh a lak ar Chaloni Tephany da ziazezañ e zisplegadenn war *Kameled* e-lec'h ez eus ur chapel da Intron Varia Rokamadour. Kinnig a ra un embroadur : *Camelenacum Camelenaco Camelec Cameled*. Disoñjet e vije bet ar CA derou get gant ar Pab.

A padal e dielloù illizoù Kemper dres d'ar meme mare (1371) e kejer adarre gant *Melenac* : *intra limites ecclesie de Melenac, Conso. Dioces.* (2). Setu ma vez kinniget un displegadenn all : bez e vije an iliz-se hini Sant Caradec e Mellak.

Ha perak ne vije ket *Ar Veleneg* ? Edo Chapel trev Bossuzit daou c'hant metr eus ar gêr. Diskaret krenn e oa a-raok an dispac'h, ar pezh a c'hell diskouez e oa kozh-tre. Er *Veleneg* e oa un ti en anv ti *ar beleg*.

---

(1) Une bulle de Grégoire XI relative à une chapelle de N.D. de Rocamadour au diocèse de Quimper. Bulletin de la Commission d'Archéologie du Diocèse de Quimper 1904.

(2) Bulletin de la Commission d'Archéologie du Diocèse de Quimper 1923. P. 342-343.

-- Meout vian, Meout vras /meoʔvien/ /meoʔvra:z/ (Meout vihan) (Meout vras), 1677 : *Mezoet uhelo*, 1678 : *Mezouhet bras*, 1678 : *Mezhouet creiz*, 1679 : *Mezouet*, 1682; *Meshouet*.

Pa 'n eus *Meout* all ebet e Penn ar Bed e ranker tostaat outañ stummoù e-giz *Mezout* (An Dre Nevez), *Mezout bihan* (Loperc'het), *Creac'h Meot* (Pleiber-Krist).

Da soñj Gwennole ar Menn e c'hell *Mezoet* bezañ an hevelep anv ha *Mezvoit* meneget gant J. Loth : *Villam MEZUOIT prope Castellum Dolis*, (1). Un anv breizhek e vije hervez hemañ ; marteze MEZ + UOIT diwar MEZ (henvrezhoneg MED) = pouvoir hag un dibenn VOIT diaes da zisplegañ.

Kinning a c'heller ivez MAEZ C'HOET gant ur c'hemmadur dre c'hwezdenniñ war batrom *Penhoet*, *Penfrat*, *Penfoull* ... Met morse ne gaver KOAD skrivet HOUET er stummoù kozh. Abalamour da se n'eus ket tu da vont gant an displegadenn-se.

-- Mesnaonic (Meznaonig), 1684 : *Mesnaounic*, 1685 : *Mesnaonic*.

Ha kinnig a c'heller c'hoazh MAEZ + anv-den. Hemañ a vije neuze AN AONIG pe AN NAONIG. Tostaat a ranker ouzh KERNAON. Un anv-den NAON a zo war roll Gourvil.

-- Munuguic **my'ny:dik** (Munudig), 1676 : *Munuguic*, 1679 : *Menuguit*.

Emichañs n'eus netra da welet gant *menudik* = serpolet, ur blantenn eus Bro Oksitania.

-- Niverrot /nive:rɔt/ (Niverot), 1678 : *Niverrot*.

Kavet 'vez *niver* en Eder, ha *nivirrit* e Kuzhon Kerfeunteun.

Tri stumm kar evit teir farrez tost ! Gant an dibenn -OT eur boas da ginnig un anv plant (gw. *Lavallot*, *Spernot*, *Nonot* ...). Pe vije -OT ul lister. Un anv-den NIVER a zo.

-- Parc Loch Guen /pa'laχkɥen/ (Park Loch Gwenn), 1540 : *Plochguen*, 1685 : *Parc Loch Guen*.

*Loch* = log. Ur fazi e tle bezañ PLOCH evit Parc LOCH.

-- Place an dañs /plas ăn dās/ (Plas an dañs)

Anv nevez. E 1835 ez eus e Kêr Lezege ur *Plasc an dañs* ha *Goarem Plasc an dañs*. Hervez ar vojenn e oa eno korollaged bemnoz gant ar gorriganed.

-- Post Cluët /pɔ'skløt/ (Post Kloued)

Dalc'het e vez ur gloued gant ur post. Bez emañ e lec'h ur park anvet *mesclouet bian* (Niverrot 1835). Kembraeg : Clwyd.

-- Prátiles /prátiles/ (Prátiles)

War zouaroù Kerangoan e oa e 1835 ur *Prad diles* hag ur *Waremm diles*. Un anv-den eo DILES a vez kavet er "Cartulaire de Redon" hag hini Kemperle..

-- Salvete /azéla:z/ (ar Sal C'hlas), 1540-1643-1720 : *Salglas*, 1563 : *La Salle Verte*

Hervez Gourvil e vije ur sal en ur maner pe un ti bras. Dont a rafe eus an alamaneg uhel. Ur *Parc ar Zal* a zo tostik eus maner Kerfres. Ul *liors an Ty glas* a gaver e 1835 perc'hennet gant ar *Sal C'hlas*.

---

(1) J. Loth : Les langues romanes et bretonne en Armorique. Revue Celtique t. 28, 1907, p. 388.



E 1563 ez eo meneget an anv gallek evit ar wech kentañ. War-lerc'h e vo dalc'hmat skrivet war ar paperioù ofisiel : le manoir et lieu noble de la Salle Verte dit anciennement Salle Glas. Un ti kozh eus Roazhon a zo e anv Maison de Salverte.

-- Servadiry /savádirri/ (Savardiri), 1604 : *Savardiry, Chevardiry*, 1680 : *Savardiry*, 1685 : *Chevardiry*.

Ur *Savardiri* all ez eus e Kuzhon Kerfeunteun parrez nesañ an Erge Vras. Sed an div gêr nemeto dezho an anv kevrinus-se.

Diri a vez tostaet peurliesañ ouzh dervenn ha lakaet da liester ar ger-mañ. Hervez ali G. ar Menn e c'hellfed tostaat anezhañ ouzh ar c'hembraeg *duiad, diriol*. Gant ar verb *diriaf* ez eus ar sterioù : to urge, press, compel, force. Dir i a gaver peusalies el lec'hanvadurezh (Ploudiri, Dirinon, Dirimeur, Irziry ...) hep ma vije tu da anataat e ster.

Savar, an tamm kentañ a vije marteze an anv-den SEVER, SAVAER, CHEVER. Tu vije da soñjal ivez e-barzh *safar, safariñ* = ober trouz pa zo meur a hini o komz kreñv a -gevret. Tro-dro da Gemper ez implijer dalc'hmat ar verb "savariñ" /savar/ da dalvezout komz. Dont a ra sur-tre eus "safariñ" met graet mat e vez an diforc'h etre *safar* (komz kreñv asambles) ha *savar* (komz).

-- Sulvintin /syl'vitiin/ (Sulvintin), 1540 : *Syulmintin*, 1676 : *Sioulmintin*, 1685 : *Siulmintin*, 1678 : *Sulmintin*

Sed un anv sklintin a vourfe ur barzh dioutañ. Petra a dalv an tamm kentañ *siul* distaget /ZY

l/ hiziv ? Kinnig a ra Gourvil ur wrizienn *sul* o tont eus al latin SOL. Diouti e teufe *Kersulec, Kersulguen, Rossulien* hag all ...

Pelletier a ro ar stummoù *siul, syul* o talvezout sioul. Bez e vije amañ neuze un emdroadur *siul sul, sioulmintin* a zo da dostaat ouzh Bro Tawel (bro sioul) meneget e Flintshire Place Names.

N'eo ket dibosubl e vije deuet ar c'hemmadur M V n'eus ket keit 'zo. Aet eo *sioul* er-maez a implij amañ hag emechañs en deus talvezet *sul* da zevezh Hor Salver evit an dud, diwezhatoc'h. A-benn neuze ez eo reizh ar c'hemmadur meneget pelloc'h.

-- Goarem vras /gwarmvraz/ (Gwaremm Vras)

Anv ur park e oa.

-- l'Hôtel /nɔtɛl/ (An Otel)

Anv un ti-koñvers e oa.

-- Loch ar C'hoat /lo:ʒaʔɑ:t/ (Loch ar C'hoat)

-- Pallach Guen

Emañ ar ger-se war roll an INSEE nemetken. Pa vez goulennet gant an dud pelec'h emañ e respontont e plas *Park Loch Gwenn*. Distaget a vez / setu perak zo bet graet ur fazi gant paotred an INSEE.

-- Park Keristin /parkkéristin/ (Park Keristin)

## 8 - LEC'HIOU ISTOREL

### a) CASTEL - CLUYOU

-- Castel /axastɛl/ (Ar C'hastell), 1540 : *an Castel*, 1684 : *Castel*

Nav *C'hastell* a gaver e Penn ar Bed. Bez e vijent lec'hioù difenn an henamzer ha marteze rakistorel. Furchadegoù n'eus ket war al lec'h-se setu n'heller ket gwiriekat kement-se evit bremañ.

-- Cluyou /klɛ̃nju/ (Kluniou), 1540 : *Cleuziou*

*Kleuz* /klɛ̃/, ar c'hleuz a zo savet da zispartiañ daou bark. Graet e vez gant douar, mein tennet eus ar park pe eus ar foz. Kreskiñ a ra gwez war ar c'hleuz.

Roiñ a ra Le Pelletier ar stumm *Cleun* : il est à croire que c'est un dialecte qui prononce ainsi pour "cleuz". E kembraeg e reer *clawdd* anezhañ.

Eno -hervez Gourvil- vije bet graet o annez gant ar Vretoned deuet a dramor dre ma chome difennoù, mogerioù eus amzer ar Galianed pe ar Gallo-Romaned. An hevelep ster a gaver e kembraeg : *clawdd* = a digging, so called from mine diggings, banks and ramparts are also designated (F.P.N.).

Maner ar C'hleuniou a zo lec'hiet war vord an hent roman Kemper-Karaez, war un uhelenn ha ne vije ket souezhus e vije bet eno ul lec'h difenn. Met n'eus ket bet graet forchadennoù el lec'h-se.

### b) ANVIOU GANT LEZ

*Lez* = e kembraeg *llys* (court)

-- Lesteriou /lɛstju:/ (Lesteriou)

Ne vez kavet nemet ur *Goarem Lestirou* e 1835. Un anv-den LESTIR a zo roet deomp gant Gourvil.

-- Lestonan Lestonan vian /lɛstɔ:n/ /lɛstɔ:n viɛn/ (Lestonan) (Lestonan Vihan) 1678 :

*Lesthonan*, 1680 : *Lestonnan huela*, 1685 : *Lestonan*

Anv un den eo TONAN sur a-walc'h. Bez 'z eus ur sant Tonan e Lestremel. Tud anavezet LE DON a zo ivez.

-- Lezebel /lɛzɛbɛl/ (Lezebel) 1458 : *Lesebell*, 1678 : *Lesebel*

Kavout a reer amañ adarre LES + anv-den. EBEL a vez kavet c'hoazh e Kerebel (1522). Ur stumm eus ABEL a rank bezañ.

-- Lezergue /lɛz'jɛrge/ (Lez Erge) 1540 : *Lesergue*, 1635 : *Lesergue*

Da dostaat e vije marteze ouzh *Lizirgy*, *Lez Hirgi* ul lec'h eus Sant Vig.

Liesgwech e vez kavet LEZ + anv parrez dreist holl e Kernev : *Lez Argol*, *Les Cast*, *Les Cleden*, *Les Crozon* (Lanveoc), *Lesgouenac'h*, *Lesplomeur*, *Lesplouenan*, *Les Plougoulm*.

-- Lezouanac'h /lɛzywānax/ (Lez Houanac'h) 1540 : *Lesgonnenech*, 1670 : *Lesoanech*, 1678 : *Lezhouenach*, 1685 : *Lezouenach*

Studiet en deus Latimier (L'inscription des Aulnays en Goméné) stummoù kozh Gomene *Govenec'h* en XIIvet kantved ha *Gouvenenec'h* e 1574.

Gwelout a ra enno *Govern-menec'h* da lavarout eo un dachenn dindan renerezh pe govern ar menec'h. Seblantout a ra ar stumm *Les gonnenech* mont a-du gant e zisplegadenn. Er c'hatolikon e kaver GOUVERN hag alies e kaver ar c'hemmeskaj N # U er skridoù kozh.

-- Mezanlez /mezãlɛz/ (Mezanlez) 1540 : *Maes an les*, 1685 : *Misanlez*

Meneget e vez anv Yvonne Mezanlez e Dielloù Illizoù Kemper e 1408. Un anv lec'h LEZMEZ a zo e Gouezeg. *Maes* a ves displeget gant Brengar (1) : park bras digleuz, gounezet a bell zo, douar labour kentañ ar barrez.

E kembraeg e talv *maes* kement a field, open country, plain (2) da laret eo ar memes tra. Emañ tostik ouzh Lezerge, maner brasañ ar barrez. *Maez Lezerge* e tle bezañ.

## 9 - ANVIOU RELIJIEL

### a) AN ILIZ, AR CHAPELIOU

-- Sant Guinal /sãngu:na/ (Sant Guinal)

An iliz barrez savet e 1526. Eil abad Landevenneg eo Sant Gwinal pe Gwenael.

-- Saint Laurent

Meneget eo e 1425. N'emañ ket war roll Couffon (Répertoire des Eglises et chapelles du diocèse de Quimper).

-- Sainte Apoline

N'eus nemet dismantrou anezhi e-pad an dispac'h. N'ouzer ket muioc'h diwar he zro.

-- Saint André /sãnane/

Savet eo bet etre 1603 ha 1630.

- Saint Guenole /sãngueno:l/

Savet eo bet e penn kentañ ar XVIvet kantved.

-- Saint Joachim /sãnʒa:ʃin/

Laket eo bet da vezañ savet gant an Aotrou Gi Autret a oa o chom e Lezerge :

---

(1) Brengar : Studiadenig diwar-benn anvioù lec'h ur barrez e Kernev-Izel en HOR YEZH niv. 2-4, 1958

(2) Davies : Flintshire Place Names

*Guy Autret fit bâtir deux chapelles (Hini Kuzhon eo an eil) l'autre sur sa terre de Lez Ergué paroisse d'Ergue Gabéric sous l'invocation de Saint Joachim, père de la Sainte Vierge en laquelle il a fondé quatre messes par semaine.* Savet e 1650 ne chom roud ebet diouti. Ur gêr e-kichen a zalc'h an anv St Joachim. *Coat Chapel* a zo nepell else.

-- Kerdevot /kɛrˈzɔ:t/, 1540 : *Kerdevot*

Savet eo bet Chapel Intron Varia Kerzevot tro ar bloavezhioù 1500. Meneget eo koulkoude e 1439, ar pezh a ziskouez eo oa ur savadur all a-raok. Pouezus eo bet a-viskoazh al lec'h er barrez. *Bourg de Kerdevot* veze skrivet dalc'hmat war zielloù ar XVIIvet kantved ha graet e veze iliz outi (*Gwaremm an Iliz* e Niverrot). Eus an tu all emañ brudet-tre ar pardon.

N'eus abeg ebet da ebet da grediñ e vije amañ ur SANT DEVOT pe DEVET. Ul lec'h a zevosion eo, staget e-barzh eñvor an dud ouzh ar vosenn e-barzh Elliant. Eno ha dije miret Mari Mamm Doue ouzh ar vosenn da zrastañ Erge. Setu perak e vije bet savet ar chapel d'he enoriñ.

E-kichen chapel Bossuzit ez eus un eien *Dour Devot* o vont d'ar Jet. Ur *foennec Dour Devot* a zo er Veleneg. Ur *Gerdevot* all a zo e parrez Lanrieg.

-- Bossuzit

Sellit pelloc'h ouzh anvioù e bod. Ne vez kavet roud ebet eus ar chapel-se, nag eus ar gêr a zalc'he an anv. Ur park *Bosuzit* a zo c'hoazh, gant an *Dour Devot*, ur wazh dour o vont d'ar stêr Jet.

-- Loqueltas /lɔˈkɛtɛs/, 1458 : *Locqueltaz*, 1676 : *Loqueltas*, 1678 : *Locgildaz*

Gwerzhet eo bet dismantrou ar chapel e-pad an dispac'h. Kavout a reer amañ *Lok Gweltas* da laret eo LOK + anv sant ar pezh vez kavet alies e Breizh (*Loc Ronan, Lokmikel, Locmaze* ...). Ul lec'h sakr, lec'h repu evit ur manac'h eo ul LOK. Kembraeg *Ilog*, loch ur manac'h. Graet e vez *Loch* e Kerne-Izel (sellit ouzh *Loch Laez, Loch ar C'hoad, Park Loch Gwenn*) eus kement savadur dister a-walc'h.

Orin an devosion da Sant Weltas a ranker klask e Ledenez Ruiz. Stag eo ouzh advavidigezh abati St Gweltas distrujet gant an Normaned tro ar bloavezhioù 1000. Aet 'z eus menec'h da bep korn ar vro war-lerc'h, o vont d'an Argoad dre ar stêrioù. Kavet 'vez chapelioù da St Weltas e bord an Odet, e Benodet, e Kombrit ha pelloc'h en douaroù e Kast (dre ar stêr Heïr) hag en Erge (stêr Jet).

b) AN TREVIOU

-- Treodet /treo:d/, (Trev an Oded) 1682 : *Treonodet, Treodet*, 1684 : *Treohodet*

-- Troland - Troland vihan /ˈtrɔlaɲvian/, (Treolann) 1458 : *Trefflan*, 1682 : *Treolann*

Kavout a reer e 1458 ar stumm kozh par d'ar c'hembraeg TREF (ville, village, résidence). Kozh-tre eo an anvioù-se, a-raok an Xvet kantved, ur rann eus ar barrez orin int. Peuliesañ int savet gant un anv den. Anv ur stêr eo Odet, Lann a c'hell bezañ amañ douar fraost ; Gregor : Lande, grande étendue de terre qui n'est pas propre au labour.

## k) AN C'HROAZIOU

-- Croix Rouge (La) /agrɔɛzry/, (Ar Groaz Ru)

Ur c'hreñvlec'h roman a zo bet e-kichen en ul lec'h anvet *Kozh Kastell*. Sed a vije chomet brikennoù ruz, ar pezh en dije roet e anv d'al lec'h. Bez zo naontek *croix rouge* hag unan *croix ru* meneget war roll an INSEE e departamant Penn ar Bed.

-- Croix St André /krɔɛz sãñane/, (Kroaz Sant Andreo)

Emañ dres e-kichen Chapel Sant Andreo.

-- Croix Spenn /krɔɛzspenn/, (Kroaz Spenn)

N'eus nemet ul lec'h gant ur seurt anv e Breizh. Hag eñ eo stag ar groaz-se ouzh istor ar Venec'h ruz, diazezet en Erge Vihan ? E skridoù ar re-mañ ez eus koaoz eus "Cruce Spina", simbol an divarvezh eo ar spenn.

Ne oa ket eus al lec'h-se war ar c'hadastr kozh. Ur *Park ar Spenn* ne oa ken. Setu perak eo furoc'h gwelet amañ anv ar wezenn (spenn du, spenn gwenn, spenn melen).

-- Menez Groaz /mi:nãgrɔɛz/, (Menez ar Groaz)

## 10 - ANV AR BARREZ : ERGE GABERIG

-- Ergue Gabéric /nergevrãz/ (Ergue Gaberig) An Erge Vras

Kevrinus eo anv o farrez d'an Argeiz. N'eus ket kavet nikun en o zouez a vefe gouest da roiñ un dalvoudegezh poellek d'ar ger ERGE. Miret 'zo bet gante menestra e vije GABERIG anv un den : d'ur mare 'zo e vije bet lodennet an Erge etre daou damm, unan o vont gant Armel hag egile gant Gaberig. Sed ar pezh a glever gigant an dud, gwelomp pelloc'h hag ar gwir zo gante.

Diwezhat a-walc'h e kaver meneg eus ERGE GABERIG 1325. Ha padal 'zo eus Erge hec'h-unan, adalek ar bloavezh 1100. Setu roll ar stummoù kozh a c'hell reiñ sklerijenn da ziskuliañ o ster dezhe :

- |          |      |                                     |
|----------|------|-------------------------------------|
| (1) 1100 | Erge | Diellaoueg Ilizoù Kemper (DIK)      |
| (2) 1160 | Elré | Diell-skrib a-beurh an Dug Konan IV |

---

(1) DIK Peyron C., Cartulaire de l'Eglise de Quimper. Quimper 1909

(2) Dom Morice, Preuves T1 p. 638

*Eleemisinae de Fou, de Brisiac, de Penbarch, de Ploeneith, de Elré, de Coton, de Macalon, de Bodoc Cap Sithun, hospitale inter duas Kimper ...*

Roll madoù ar Venec'h Ruz e Breizh an hini eo. En Erge Vihan e oa ur chapelig "ar Gelenn" dalc'het gante hag emichañs Maner ar Plesis Erge. En e bennad diwar-benn Ergue-Armel (monographies paroissiales in bulletin de la Commission diocésaine d'histoire et d'archéologie) e ro ar chaloni Peyron ar stumm ARKE e-lec'h ELRE a vez kavet e Dom Morice.

|      |                |                   |
|------|----------------|-------------------|
| 1244 | Erge Arthmael  | DIK               |
| 1278 | Erge Foenant   | DIK               |
| 1296 | Erge Arzmael   | DIK               |
| 1325 | Erge Gaboric   | DIK               |
| 1327 | Erge Gaburic   | DIK               |
| 1458 | Ergue Gaberic  | Dielloù ar barrez |
| 1540 | Ergue Gaberyc  | Dielloù ar barrez |
| 1604 | Ergué Gabellic | Dielloù ar barrez |

Kinnig a ra Smith (1) dowar ali Yeun ar Gow, keñveriañ Erge ouzh Erquy. Setu tal o stummoù koshañ :

|      |      |           |          |
|------|------|-----------|----------|
| 1100 | Erge | 1167-1223 | Erque    |
| 1160 | Elre | 1237      | Arke     |
| 1278 | Erge | 1330      | Herqueio |

Diouer a stummoù boutin a zo, siwazh deomp. Kement-se n'eo ket souezhus rak n'int ket kozh anezhe hag en XIIvet kantved e oa dija degouezhet ur c'hemm pouezus : divrezhonekadur Breizh-Uhel, a c'hell displegañ an diouer-se.

Lakaomp un henstumm ARKAE oc'h emdroiñ da ARKE ERKE ERGE. Embroadur an henvrezhoneg d'ar c'hrennvrezhoneg a zo da gentañ kemm an taol-mouezh o tremen eus ar sillabenn diwezhañ d'an eil diwezhañ. Displegañ a ra e vije aet an diftongenn /AE/ taol-mouezhiet da /E/, houmañ o levezoniñ an A derou ger o vont da /E/.

E-keit-se e vije bet divrezhonekaet Bro Erki ha chomet lug emdroadur ERKE er vro nevez gounezet d'ar galleg. E bro Gemper e vije aet ERKE da ERGE, K o vlotaat da G da heul dilec'hiadur an taol-mouezh war ar sillabenn gentañ.

E bro Zol er c'hontrol ez eus ur skouer eus an diftongenn /ae/ miret betek diwezhat-tre. Ul lec'h LAIRGUE a zo, un tri c'hard lev bennak eus hêrbenn an Eskopti. Meneget eo gant Loth (2) en e studiadenn war vuhez Sant Teliâu, ha roiñ a ra deomp ar stummoù kozh ERGAE hag ARGAE kent ar XVIIvet kantved. Lavarout a ra ouzhpenn e teufent sur-a-walc'h eus stummoù koshoc'h AR-CAI, ER-CAI. Dont a ra c'hellfent eus ar c'hembraeg ARGAE = digue, barrage pe eus un anv den CAI. Ur sant CAI a oa gwechall ha bez e vije ur feunteun o virout e anv tostik da Zol. Eno nepell eus LAIRGUE ez eus ur vourc'h CARFANTAIN a c'hellfe bezañ un treuzskrivadur eus CAI-FEUNTEUN. Diskouez a ra atav ez eus ur feunteun vrudet a-walc'h er vro-se evit ma vefe krouet anv ur barrez diwarni. Mag eo anezhi Feunteun AR-CAI e vije amañ un anv sant pe un anv den. Ur senechal KAI, CAI a zo brudet e Dañvez Breizh (3).

Un nebeut anvioù-lec'h eus Kembre a zo da dostaat ouzh ERGE : *Yr Argae, Argae, Cefn Erow yr Argey, Rhyd yr Argey* (Sir Fflint) (4). Diwar o fenn e ro Davies an displegadenn : AR = in front of, before (a-dal da, dirak)

CAE = enclosure, what encloses (klozadur, ar pezh a gloz)

E geriadur ar Prifysgol a vez resisaet CAE = hedge, circle, sphere, barrier, obstruction (garzh, kloued, harzh, klozadur).

(1) W.B.S. SMITH : de la Toponymie Bretagne. New York 1940.

(2) J. LOTH : La Vie de St Teliâu in A.B., T 10, p. 75

(3) R. BROMWICH : Trioedd Ynys Prydein, p. 307

(4) E. DAVIES : Flintshire Place Names. Gwaq Prifysgol Cymru 1959

AR a gaver e brezhoneg e gerioù e-giz ARgoad, ARvor. ARmor = qui est sur les bords de mer (1). KAE 'zo anavezet mat ivez gant ar ster Garzh (geriadur istorel), *Haye d'espine* (Catalicon). Kevrennet eo an daou c'her e-barzh ARGAEENN a vez displeget gant Roparz Hemon : première haie placée devant une autre. Meneget eo ivez e Geriadurig Ernault (Argenn). Gwregel eo argaeenn e-giz ERGE.

Diwar skouer ar c'hembraeg ez eus tu goulakaat un henstrumm ARKAE. KAE a vije amañ gant ar ster ledanoc'h en doa e kembraeg : harzoù, lec'hioù difenn. Gouzout a ouzer e oa tro dro da Gemper-Kaourintin lec'hioù difenn, ha kregiñ a ra Erge dres war Venez ar Fruji lec'h oa ur c'hreñvlec'h roman. Tal d'ar Fruji emañ Penn-Harz a c'hellfe tennañ e anv eus al lec'hioù difenn-se, e-giz Erge.

Kinniget en deus Gourvil (2) un displegadenn all, o tiazazañ e breder war labourioù Fleuriot (3) : Bez emañ an anvioù-lec'h oc'h echuiñ gant E rouez-tre e Breizh-Izel. Aet eo an dibenn -ACUM da -E er vro nannvrezhonekaet da dra m'eo aet da -AC er vro vrezhonek. SENACUM zo aet da SENE da skouer ha diwar an emdroadur-se e c'heller goulakaat e vije chomet bev pelloc'h yezh ar Romaned el ledenez-se.

Diwar skouer SENE ze eo posubl e vije chomet trevadennoù romanegerien e lec'hioù 'zo ha marteze war saon an Oded. Skrivañ a ra Gourvil : "A l'intérieur même de la zone bretonnante ont dû persister jusqu'au VIIIème siècle des îlots de langue romane à Séné, à Berné, à Rédéné, Taulé, Ergué etc".

N'heller ket kinnig un henstumm ARKACUM war batrom SECACUM SENE. Gwirheñveloc'h e vije ARCEA ARCE ARKE met n'eus diell ebet o c'hadarnaat kement-se na kennebeut e vije bet un drevadenn romanegerien war c'hlann an Oded. Anvioù-lec'h ARCEA, ARCE a gaver koulskoude met er maez eus Breizh.

Menegiñ a ra Holder (4) ARCEA (Arce e-kichen Sens) a gaver e Buhez S. Ebbonis ha S. Gerici : "Locus Arcea ab antiquis cognominatur".

ARCE : ur stêr eus departamant an Aube an hini eo. Stummoù kozh : Archia Arcia (1147) ; Arcia (1263)

- : ur stêr eus departamant ar Charente

VAL D'ARCE e-kichen Bure les Templiers.

A orin hengeltiek e vije an daou anv-lec'h-se. Diaes e vije lavarout peseurt kerentiezh -ma 'zo diouti ?- a zo ganto han gant Erge.

N'eo nemet e 1244 e kaver un anv staget da Erge : *Erge Arthmael*. *Erge Foenant* (1278) a dalv sur a-walc'h evit an Erge war-zu Foenant da lavarout eo Arge Armel. E 1325 nemetken e kaver meneg eus *Erge Gaborig*. Sur a-walc'h ne oa da zigentañ nemet ur barrez, bet lodennet marteze en XIIIvet kantved. An anv Erge Foenant o tiplegañ emichañs ne vije ket diazezet mat an anvioù ofisiel d'ar mare-se c'hoazh.

Un diforc'h bras a verzer d'ar mare-se etre parrezioù bihan kornog an Oded (*Ploemeryn, Bod Dewit, Ploecufvan, Penn Harth, Ploeneth, Cuthon, Caer Feunteun* hag all) ha parrezioù brasec'hon ar reter : *Brithiac, Erge, Elgent* ... N'eo ket souezhus neuze en dije klasket an Eskopti lodennañ anezho d'o merañ gwelloc'h. Deuet e vijent a-benn evit Erge marteze dre ma oa an Eskob genidik a Erge.

---

(1) J. LOTH : Chrestomathie Bretonne. Paris 1891


(2) F. GOURVIL : Noms de Famille Bretons d'origine toponymique, p XXXII.

(3) J.L. FLEURIOT : Recherches sur les enclaves romanes anciennes en territoire bretonnant in Etudes Celtiques 1958.

(4) A. HOLDER : Alt Celtischer Sprachschatz T I-III. Leipzig 1925

Ma 'z eo bet staget anv ur sant d'an Erge war-zu Foenant n'eus ket anavezet Sant Gaberic ebet. Anv un den e tle bezañ : menegiñ a ra Ogée un Eon de Gaberic o chom e parrez Elven tro ar bloavezhioù 1400. Krediñ a ra deomp koulskoude ez eo an den-se Yves Cabellic, eskop Kerne eus 1267 da 1280 war dro (1). Gantañ e oa an hevelep ardamez ha tudjantil Lezerge, o deus a-vis-koazh ar vrud da vezañ savet an iliz parrez.

Ar stummoù GABELLIC kavet kalz diwezhatoc'h e penn kentañ ar XVIIvet kantved a ya a-du gant an displegadenn-se. Eus un tu all n'eo ket rouez ar c'hemmesk L - R an anvioù-lec'h : Ploemeryn > Plomelin. Erge o vezañ gwregel (An Erge Vras a vez lavaret) ez eo reizh ar c'hemmadur K.G Cabellic > Gabellic. Ur stumm ERGUE GABERIC a gaver e 1458 o tiskouez ar stumm nann-kemmet e-giz ma oa ar boaz e krennvrezhoneg.



---


(1) OGEE : Dictionnaire Historique et Géographique de Bretagne. T II. p. 408



## AN EMDROADUR

### 1- AR C'HERIOU KOSHAN

Dre ziouer a rolloù kent an Dispac'h Bras, n'eus ket tu da c'houzout penaos na pevare ez eus krouet kêrioù nevez. N'eus nemet pemzek kêr meneget a-raok 1500, hanter-kant a-raok 1600, daouzek ha pevar-urgent a-raok 1700. Dre ma kaver stankoc'h an dielloù e ya o niver war greskiñ eveljust. Setu da heul ur gartenn gant an anvioù-lec'h kent 1600.



Kalz stankoc'h eo ar c'hêrioù eus tu ar mervent e-lec'h e oa ar muiañ a hentoù. Lakaat a ra ez eo a-bep tu eus an hentoù roman ez eo bet gounezet an douaroù da gentañ gant ar beizanted.

## 2- AN ANVIOU-LEC'H NEVEZ KROUET ABAOE 1835

74 anv-lec'h nevez a zo bet krouet eus 1834 da 1962. N'eo ket souezhus pa seller eo kresket ar boblañs er gumm eus 58% etre 1801 ha 1911, o tremen eus 1781 annezad da 2828 e 1911. Koulskoude n'eus bet savet hogozik atant nevez ebet. Poblañ ar vevelien hag an devezhourien a zo aet dreist-holl war gresk. Hini ar vicherourien ivez tro-dro d'ar Veilh Paper savet da vare Napoleon Kozh.

An anvioù-lec'h nevez krouet gant an dud-se da eñvel o zi n'int ket bet ijinet gante diwar netra. Peurliesañ eo un anv-park pe un anv-hent. Stankoc'h eo c'hoazh an anvioù gant *stank*, *menez*, *ti* heuilhiet gant anv ur gêr.

### a) AN ANVIOU GANT KER

*Ker Anna, Kernilis, Kerongnes, Kervern, Kerjean, Kerlanic, Kerlouis*. Atantoù int holl anezho. Pevar dioute a seblant bezañ bet savet gant KER + anv-bihan. *Kervern* a vez displeget aes a-walc'h padal *Kernilis* ha *Kerongnes* n'eo ket anat o ster dezho.

### b) ANVIOU-KER + BIHAN

*Lestonan Vian, Trolan Vian, Kêriou Vian*

### k) HENTOU

*Croissant Guilly, Croissant Vras, Drohen, Pen ar Garn, Pen Alle Congallic, Pen Carn Lestonan*.

### d) PARKOU

*Goarem Vras, Parc Feunteun, Parc Keristin, Plas an dañs, Penvern, Pratiles, Vruguic*.

### e) KROAZIOU

*La Croix Rouge, Croix St André, Croix Spenn*

### f) KOADOU

*Coat Chapel, Coat Niverrot, Cadigou, Loch ar C'hoat, Pen ar C'hoat*

### g) MEILH

*Meilh Poull*

### h) PONT

*Pont St Eloi*

### i) OSTALIDI

*l'Hôtel*

### j) ANVIOU ALL

*Baradozic, Bigoudic, Lesteriou, Post Clued, Pouldu, Reunic, Rouillen*

### l) MENEZ + ANV KER

*Menez Squividan, Menez Castel, Menez Kerdevot, Menez Kerveady, Menez Loqueltas, Menez Niverrot, Meneg Groas*.

### m) STANK

Stank + anv-kêr : *Stank Kerellou, Stank Kermoysan, Stank Melennec, Stank Pennarun, Stank Quenach Daniel.*

Stank + anv ster : *Stank Jet, Stank Odet*

Stank + anvioù all : *Stangala, Stank ar C'hoat, Stank Luzigou, Stank Venn.*

### n) TI

*Ty Bur, Ty Coat, Ty Kerdevot, Ty Kerveguen, Ty St André.*

### o) TI-NEVEZ

*Ty Nevez Castel, Ty Nevez Kerfort, Ty Nevez Kergaradec, Ty Nevez Kerlies, Ty Nevez Kernaou, Ty Nevez Kerourvois, Ty Nevez Kerveguen, Ty Nevez Lezouanac'h, Ty Nevez Mezanlez, Ty Nevez Pen Menez.*

## 3 - AR C'HERIOU AET DA GET EUS 1834 DA 1962

Dek anv-lec'h ne vez ket mui meneget war ar c'hadastr-nevez. Dre m'emañ kouezhet un ti en e boull e ya an anv da get, met miret e vez e-barzh eñvor an dud. Degouezhout a ra bremañ e vez lonket ur ger gant annezadegoù pe gant ar vourc'h. A-benn neuze e tegouezh e yafe un anv kozh da get.

Setu petra zo degouezhet gant *Koutili* a zo bet prenet evit ober un uzin tredan. N'eus nemet ar re gozh a oar 'zo bet ur gêr eno gwechall.

Ar c'hêrioù all a zo kouezhet en o foull : *Bossuzit, Kernena, Mesnaonic, Pont Patra, Meilh Coat Piriou, Meilh Kerfort, Meilh Kernaou, Meilh Cluyou.*


*Ker Jenny* a oa un anv souezhus anezhañ e 1835, a vez graet *Ty Bur* anezhi bremañ.


## 4- AR GER HAG HE PARKOU

Setu ur skouer eus ur gêr a zo staget he holl parkoù tro-dro d'ar pourpez. Tu a zo da geñveriañ kartenn 1834 ouzh hini 1962 hag an nebeut cheñchamantoù a zo bet. Kalzig kleuzioù a zo bet diskaret ha kuit gante parkoù 'zo. Re all dizarempred zo bet disoñjet o anv : *Stanc Conogan, Pradic ar Pont* da skouer.

N'eo ket rouez kennebeut e vije cheñchet anv ur park : war rolloù 'zo eus 1782 ha 1793 ez eus parkoù n'int ket mui meneget pelloc'h : *Trichinnec bras, Trichinnec Bian*. Re all o deus daou anv : *Foennec Verla* ou *Gourla, Parc ar Roch Guen* ou *Ros Huen*. Hemañ anvet *Gwaremm ar Roc'h Wenn* war vammennoù kadastr 1834 a zo distaget /ru:zýyɛn/ (Roz Huen) hiziv.

Ur park all ne oar ket mui tud ar gêr petra a dalv an anv : *Parc ar Faven* (1782), *Parc ar Fauen* (1793), *Parc ar Foen* (1834). Distaget eo /parkfaɛl/ hiziv.





## ROLL AN ANVIOU-LEC'H STUDIET

| Distagadur                  | Kadastr 1962 | Roll an INSEE 1946 | Kadastr 1834                       | Stummoù koshoc'h   |
|-----------------------------|--------------|--------------------|------------------------------------|--|
| <b>ba'länu</b>              | Balannou     | Balanou            | Balannou                           | Banazlou 1540  |
| <b>bara'do:zik</b>          | Baradozic    | =                  | 0                                  | 0  |
| <b>bek mi:n</b>             | Bec ar menez | Beg-a-menez        | Bec ar menez                       | Bec ar menez 1678  |
| <b>bi'gø:dik</b>            | Bigoudic     | 0                  | 0                                  | 0  |
| <b>bu:n</b>                 | Boden        | =                  | =                                  | Boden Pridiry an laez 1544<br>Boden 1685<br>Botden 1685  |
| <b>bo'yars</b>              | Bohars       | =                  | =                                  | Botgarz 1540 - 1682  |
| <b>bos'ydik<br/>bosyzik</b> | 0            | 0                  | Bussuzit huella<br>Bussuzit izella | Botsinzic 1325<br>Botsieusic 1540<br>Bossieusic 1540<br>Bosseudic 1643<br>Bodseudic 1643<br>Bodseusic 1643<br>Bosuzit 1678<br>Botsuisic 1682 |
| <b>ayqa'digu</b>            | Cadigou      | =                  | 0                                  | 0  |
| <b>karbõnt</b>              | Carpont      | =                  | =                                  | Carbont 1458<br>1540 1639<br>Carpont 1670<br>1677 1682   |
| <b>axastel</b>              | Castel       | Castel             | Castel                             | An Castel 1540   |
| <b>klēnju</b>               | Cleuyou      | Cluyou             | Cleuyou                            | Cleuziou 1540  |
| <b>kɔa:t ʃap<br/>el</b>     | Coat Chapel  | =                  | =                                  | 0  |
| <b>kɔa:t ni'v<br/>erɔt</b>  | 0            | Coat Niverrot      | 0                                  | 0  |
| <b>kɔa:t pirj<br/>u</b>     | Coat Piriou  | =                  | =                                  | Coat Piriou 1683   |
| <b>ku:tili</b>              | 0            | Coutilly           | Coutily                            | Cutullic 1458<br>1540<br>Cutuillic 1666<br>Guteuillic 1680<br>Gueutuilli 1683  |